

BROGAROUR

Trec'h ar garantez

ROMANT

Ar romant-mañ a zo kinniget, e testeni a gengarantez, da Ensellerien, da Vistri ha Mestrezed-skol, da holl Skolidi skoliou Breiz.

En aviz aesât d'ar vugale e lenn, daoust ma n'eo ket uhel ar brezoneg anezan, hon eus sonjet lakât, e fin al levr, eur roll-geriou, roll ar geriou diaesa.

Pep gwir miret striz.

I. Brao - Brao ! « Paotred-Dispont ! »

Milin-baper an Odet a zo e parrez Erge-Gaberig harp ouz kêr Kemper. Erge-Gaberig zo anavezetoc'h war dro Kemper dindan an ano Erge-Vras. An Erge-Vihan eo ar barrez amezek Erge-Armel.

Evit mont eus Kemper d'ar vilin-baper e vez kemeret hent Kore. Eul leo hanter bennak eus Kemper e kaver eun hent a gleiz el lec'h anvet Park-al-Lann. O vont gant an hent-se ez engaver, eun daouzek kant metr bennak pelloc'h, gant tiez kenta an Odet.

Araok diskenn e traonienn an Odet, a gleiz, daou di-skol stummet kaer. Soñjal a rit dioustu ez int skoliou ar C'houarnamant, dre ma n'eo ket ar gatoliged kustum da gaout paleziou evit skolia o bugale.

Fazia a rit en taol-mañ.

An daou di-mañ eo an daou di-skol kristen. Breudeur ar gelennadurez kristen, bugale ar beleg santel Yann-Mari La Mennais a zo e penn skol ar baotred. Skol ar baotreded a zo e karg leanezed ar Spered-Santel pe « al Leanezed gwenn ».

Mestr madelezus ar vilin-baper, an Aotrou Keraudren, eo en deus savet ar skoliou-mañ evit bugale e labourerien.

E hanter an diskenn, a-zehou, ar pezh a c'halver « ar gêriadenn », kêriadenn Santez-Anna pe tiez al labourerien. En tu all d'an hent, dirak tiez Santez-Anna, war an izel, eul letonenn gaer : tachenn-c'hoari ar « Baotred-Dispont » A-drek an dachenn, ouz he linenna, emañ ti ar patronaj. Kaeroc'h ne gaver ket kalz e Breiz. Eur c'hoariva a zo ennan ha binviou evit an embregerezh-korf. War an dalbenn trigorniek giz breizek bremañ e lenner « *Patronage du Sacré-Cœur* ». Skeudenn ar Galon-Sakr a sked war korn uhela an dalbenn.

E tro kein ar patronaj e kaver eun tiig all, ti ar c'hoariou : boulou-taol, kartou, pionou hag all.... Mestr ar vilin-baper en deus graet mat ha brao....

Diskennomp gant an hent bras betek traonienn an Odet.

Eomp dre zor an ti-porzier aze dirazomp.

Ar vali a zo dirak hon daoulagad a gas a-gleiz, d'ar chapel hag a-zehou, d'an ti-annez.

Eur chapel a zo en Odet rak ar vilin-baper he deus lakaet eur vourc'h da sevel amañ. An Ao. Keraudren en deus soñjet dioustu kempenn eun ti d'an Aotrou Doue. Eun aluzenner en deus bet digant an Aotrou 'n Eskob.

Diaes e ve d'an aluzenner-se entent mat ouz al labourerien o lakaat e rankfe mont bemdez da loja da bresbital Erge. Roet eus d'ezan eun ti, an ti stlalfou melen a weler e skeud reier ar c'hrugel, harp ouz ar gambr pilhou.

Odet a zo deut evelse da ober eur barrezig e parrez vras Erge-Gaberig.

Ar chapel a zo unan gaer. An Ao. Keraudren en deus komprenet mat e rank an Aotrou Doue kaout eun ti dereat. Ar chapel en deus savet a zo unan giz breizek bremañ, izel gant prenestrour ledan. Gwer lies-livet, skeudennet warno portredour patroned ha patronezed izili familh Keraudren : sant Renan, santez Mari Madalen, sant Herri, sant Gwennole..., hag all, a ro liou lirin da vannou an heol a dremen drezo hag a c'hoarz war leur ar chapel.

Eul letonenn glas-gwer a ziskenn war bouezig traon eus ar chapel d'an ti-annez.

War al letonenn, e-kichen gwazig an Odet, eur c'halvar breizek. Prenet eo bet gant perc'henn ar vilin-baper ha digaset amañ eus Scrignac.

An ti-annez a zo heñvel awalc'h ouz maneriou Breiz, prenestrou ledan ennan, rak-se sklerijennet mat.

A-drek an ti, emañ ar vilin-baper. Amañ eo e vez kempennet ar paper sigaretennou. Ar paper-mañ, ar pep brasa anezan da vihana, a ya d'ar Stadou-Unanet ha da Vro-Saoz. Ret mat eo gwelout evit gouzout an tamm labour a zo da ober paper gwenn-kann ha tano-tano eus pilhou ha kerdin.

Diboultrennet, skaotet, gwalc'het, freuzet, difreuzet, gwalc'het adarre, gwennaet, troet e kaot, kaset e dourenn, dizec'het war eul lienenn o trei hep ehan war binviou-tro, ar pilhou a vez kaset eus eur gambr d'eben, a dremen dre bep seurt binviou hag a deu da veza ar paper sigaretennou a anavezomp.

Evit lakaat ar binviou-milin da vont en dro e vez kempennet tredan dre eun tredaner gant glaou pe gant dour pa vez dour awalc'h en Odet.

Ar binviou a drouz en ti-labour hag e-kichen ar waz Odet a gan o vont a roc'h da roc'h, epad ma klever, etouez ar gwez, an evned o richana.

Eun dudi eo kerzout dre goadou ar vilin-baper a bep tu d'an Odet, d'an nevez amzer, pe en hañv pe c'hoaz d'an diskar-amzer pa vez gwisket ar gwez gant deliou lieslivet.

N'oar ket evit mirout da estlammi ha da anzav ez eo Mestr ar Bed eun ijinour-kaer hep e bar.

Sul diweza a viz meurs a zo anezan.

Eur mor a dud a zired en abardaez-mañ da zraonienn milin-baper an Odet.

Hirio emañ krogad diweza kenstrivadeg polod-troad patronajou Breiz a-bez.

Ar « Baotred-Dispont » a zo chomet an trec'h ganto beteghen en hevelep amzer gant « Yaouerien Breiz » (*Cadets de Bretagne*).

Ar re-mañ a deu da Odet da glask ar maout.

C'hoari a vezo, anat eo. An abadenn a bromet beza plijus da welout ha moarvat e vezo tomm da groc'hen ar c'hoarierien ! « Yaouerien Breiz », end-eeun, a zo paotred ouesk ha kreñv. Trec'h int bet da veur a « vandenn » lakaet evit didrec'hus.

N'eo ket gwir, ne c'hall ket beza gwir e chom ar « Baotred-Dispont » evit ar stourmad-kloz !

Re wir eo... ha beteghen eo diaes awalc'h gouzout da belec'h ez ay ar maout, pe e chomo en Odet pe ez ay da Roazon, pe e chomo e Breiz-Izel pe ez ay da Vreiz-Uhel.

Rak ar « Baotred-Dispont » o deus kaset d'ar gêr meur a « unnek » all anavezet egiz tud gouest.

Lod a lavar e vezo Breiz-Uhel trec'h da Vreiz-Izel.

Lod all, er C'hontrol, e ranko paotred Roazon plega da baotred an Odet. Rak, emezont, m'eo eun tammig kreñvoc'h ar « Yaouerien », ar « Baotred-Dispont » a zo war o-zachenn ha dirak o anaoudegez.

C'hoari a vezo hep mar ebet...

Hag an dud a deu a vagadou.

Kirri-dre-dan, gweturiou, motoiou, veloioù a zegas gwazed ha merc'hed, tud yaouank ha tud koz.

— Arsa ! Yann, na diot e teuomp da veza war hor c'hozni ! Dont da welout paotred yaouank o rei taolioù treid d'eur polotr !

— Ni, Gwennole, n'omp na sotoc'h na furoc'h eget hon tadou koz. Daoust ha ne deuent ket da sellout ouzimp o c'hourenata ? Bremañ eman ar c'hiz ouspenn da ober *foot-ball* (eur ger saoznek ha n'ouzoun ket perak e vez graet kement anezan e Breiz hag e Bro-C'hall !)

— Gwir awalc'h a lavarez, Yann. Ar re goz a ya atao da welout ar re yaouank. Plijadur o deus o soñjal er pez int bet gwechall o welout ar pez eo bremañ o bugale....

Hag an daou baotr-koz da gomz a-zivout an amzer dremenet, a-zivout o nerz, o zaoliou-dreist... hag ivez eus ar c'hoari polotr-troad, rak lennet mat o deus, hep hen anzav an eil d'egile, kement tra a zo bet merket war ar c'hazetennou diwar-benn abadennou ar *foot-ball*.

A-zioc'h an dachenn-c'hoari, a-hed ar vali ledan grouanet hag a servij da leurenn evit an arvestourien, an dud a zo a verniou.

Biskoaz n'eus bet gwelet kement a dud en Odet

War an hent bras, diou, teir renkennad sellerien a glask al lec'h gwella d'o meno da welout an abadenn.

Ar re-mañ ne rankont ket paea ar gwir-antreal, met araok pell e teuor da gestal priz ar gwir-se. Penaos nac'h pa ro ar re all ? Ha neuze plac'hed yaouank an Odet gant o dilhad boulouz ha seiz alaouret a ray an dro. Ar mousc'hoarzhou plijus a rank beza paeet, neketa, Monig?

Dre ma ez en em gavont, an dud a gomz diwarbenn ar c'hoari a zo dirazo : Paotred bihan ar « Yaouerien » ha re ar « Baotred Dispont » o deus eur c'hrogad evit digeri an abadenn hag evit rei amzer d'an dud, da zegouezout.

Plijadur o deus an dud koz hag ar re yaouankoc'h o welout penaos an diwesker bihan a ya hag a deu ha penaos e promet meur a hini eus ar « voused-se » beza diwezatoc'h c'hoarierien dispar.

Daou pe dri lamm « brao » a-stok ar c'horf a laka ar sellerien da c'hoarzin ha da strakal o daouarn....

Paotred bihan an Odet a rank plega d'ar « Yaouerien » bihan : 2 bal da unan.

Div eur nemet kart... Eun taol sut : c'hoarierien ar c'henstrivadeg bras !

Unnek ar « Yaouerien » a deu war an dachenn. Strakadeg daouarn. Paotred yac'h e seblantont holl beza gant o diwesker hag o divrec'h kigennek.

— Fei ! Aotrou Kure, hor paotred a c'hell mont da glask lipat ! Biken ne vezint trec'h d'ar pabored-se !

— Marteze, marteze, Youen koz, hor re-ni n'int ket fall kennebeut....

Aotrou kure Ergue-Vras a zo deut da welout an abadenn ha da heta chañs-vat d'e genvreuz aluzenner ar « Baotred Dispont »

P'eo echu ar strakadeg-daouarn d'ar « Yaouerien », e teu an unnek « Paotr Dispont » er maez eus an ti-patronaj ; fringal ha c'hoarzin a reont.

— C'hoarzin a c'hellont, ya, eme Youen koz, gwelloc'h eo d'ezo hen ober bremañ rak moarvat a-benn fin an abadenn o devo dic'hoarzet.

— Mat ! Youen na troet oc'h da welout an traou war o zu enep !

— Pa lavar an d'eoc'h, Aotrou kure, graet eo ganto ! Eun dra bennak a lavar kement-se d'in ha rouez ar wechou m'eo bet faziet Youen-koz, Aotrou kure.

— Eur wech, da vihanañ oc'h bet faziet Youen, en ho puhez ! En devez m'ho peus kemeret eur wezenn evit eun den ! !... Gwir eo oa tommet d'eoc'h eun tammig... diouz m'am eus klevet.

— A ! fei ! Aotrou kure, eur c'hovad a oa ganin en devez-se. N'eus ket da lavarout nann.

Eun taol sut. An abadenn a zigor. An taol-digor a zo roet d'ar « Yaouerien » dre m'eo engavet an abadenn diweza war dachenn ar Baotred Dispont.

Ar polotr a vez kaset ha digaset. Ar c'hoarierien gant o gwiskamant a liou a laka pikou flamm war al letonenn c'hlas.

Dek munut goude m'eo digoret ar c'hoari hini eus an diou vandenn n'he deus « merket ».

Ar polotr koulskoude a vez meur a wech e-kichen ar pal e pep kamp. Met warlerc'hidi ar « Yaouerien » ha « paler » ar « Baotred Dispont » o deus miret bep taol ouz ar polotr da vont er roued.

Ar « Yaouerien » a sav eun tammig imor enno. En em lakaat a reont a-zevri, c'hoant o deus da werka dioustu, rak, moarvat, da fin ar c'hoari, ar « Baotred Dispont » a gavo kennerz, en o skuizder, e komzou broudus ar sellerien.

Al « linenn genta » a c'hell kemerout ar polotr : treuzi a ra linenn-greiz ar Baotred Dispont ha, dre rei ha reseo, ez a betek an daou warlerc'hiad. Eun taol-troad a-dreuz hag emañ ar polotr a-drek kein ar re-mañ, met Gwennole, paler ar « Baotred Dispont » en deus gwelet. Sellout piz a ra ouz an « araoger », gwelout mat a ra pe hent a ray ar polotr dre zoare an araoger da lakaat e droad ha, d'an ampoent m'emañ ar polotr skoet a gas etre diou varenn, Gwennole, digor e zaouarn gantan, a zo ouz e c'hedal... Prizoniet eo ar polotr etre e vizied nerzuz ha gant eun taol-troad sec'h eo kaset e-kreiz an dachenn araok m'o deus an araogerien eneberien gellet tostaat.

Brao-brao ! Gwennig !

Hag ar sellerien a strak o daouarn da baler ar « Baotred Dispont ».

— Piou eo ar paler ouesk-se ? a c'houlenn eur vaouez demdost da Youen Ar Berr.

Youen, ha ne c'houlenn ket gwelloc'h eget ober eur varvailhadenn (an Aotrou kure a zo aet kuit, end-eeun, da gavout an aluzenner war linenn an dachenn-c'hoari), a lavar d'ezi dre dostaat :

— Itron, ar paotr yaouank-se a zo eur pabor, m'hel lavar d'eoc'h. N'eus ket en Odet eun den ken barrek hag heñ war an embregerez-korf, n'eus ket zoken e rann-vro Kemper nag e Kerne a-bez. Anaout mat a raen e dad, Doue r'e bardono ! Lazet eo bet dek vloaz bennak a zo o labourat er vilin-baper. Eun den hegarat oa heñ, e c'hellit va c'hredi. Karet gant an holl dre ma 'z oa mat ouz an holl ha dre ma lakae an traou atao war eeun. Ad-mestr oa er vilin-baper...

— Ha pe ano en deus e vab ?

— Gwennole, evel e dad, Gwennole Naour...

Youen, anat eo, ne c'houlenn ket gwelloc'h eget kenderc'hel. Met an Itron. ne selaou ket ken. Awalc'h he deus da ober o sellout ouz Gwennole o tifenn ar pal. Ha Gwennole en deus ivez awalc'h da ober evit mirout ouz ar polotr mont etre ar barrennou, er roued. Gant e dreid, e zaouarn, e benn e vir outan bep taol da dremen e-biou d'ar porzier.

An holl a wel peurvat eo kreñvoc'h ar Yaouerien hag an holl a soñj ivez ne vezo ket Gwennole evit mirout ouz an holl paliou. Da skuiza e teuy buan hag ar polotr, a-barz ar fin, a gavo tro da vont da ruilh e dounder ar roued staget ouz ar varrenn koat treuz a-dreñv da linenn ar pal.

Ar « Baotred Dispont » a ve lavaret holl fall-galonet. An dud a gri warno.

— Alo ! Paotred Dispont ! na lezit ket Gwennole d'en em greñvi ?

Ar barner tredeog a ra sellou du ouz an dud. Arabat e ve fallgalonet ar Yaouerien d'o zro diwar goust ar sellerien. Ar reizded da genta.

Evel p'o defe bet eun taol-skourjez, ar Baotred Dispont a laka bremañ o holl

imor, met an amzer a dremen. Emañ ar c'hoariadenn genta, an tri c'hart eur kenta, o vont da deuzi.

Unan eus warlerc'hidi ar « Baotred Dispont » a c'hall gant eun taol troad skoet kreñv hag eeun kas ar polotr er penn all d'an dachenn. Hanteriad kreiz ar « Yaouerien » en em gav da genta warnan, met mankout a ra e daol, re vuan eo aet gant aon rak Lan Gourmelen, araoger-kreiz an Odet, hag a deue warnan a-benn herr. Ar polotr ne yeas ket da bell. Mignon Lan, an araoger etre-daou, e baskas hag eur pennadig goude e roe hen da Lan. Lan a ya, a ya gant ar gleurou. Emañ o vont da skei kalet wardu ar pal, pa deu, na ouzer ket penaos, warlerc'hiad ar Yaouerien da laerez ar polotr.

An dud n'o deus ket bet amzer da welout penaos eo tremenet an traou p'emañ ar polotr adarre dirak pal paotred an Odet.

An hanteriad-dehou en deus e baket ha taolet e kreiz d'an araoger-kreiz Loeiz Neveu. Hemañ ne goll ket e amzer ha, goude beza gounezet unan eus ar warlerc'hidi eneberien, a sko sec'h etrezek ar pal. Gwennole n'en deus ket gwelet mat, kuzet m'eo bet ar polotr d'ezan gant an eil warlerc'hiad. Ar polotr a dremen an nor hag a ya da ziskuiza e dounder ar roued.

Ar Yaouerien : 1 ; Paotred Dispont : 0.

An ehan a zo sutet dioustu goude.

— N'em eus ket lavaret d'eoc'h, Aotrou kure ? koll int pa lavaran. Kalz eo kreñvoc'h ar « Yaouerien »...

— Gortozomp c'hoaz, Youen. Hor re-ni n'o deus ket lavaret o ger diweza. Kaout a ra d'in o deus lezet o eneberien d'en em skuiza. Ar c'hoariadenn bremañ a vezo tennoc'h, a gav din.

Hag an Aotrou Kure, salutet gant an holl, a gendalc'h gant e vale. Emañ o klask an Aotrou Person — deut ivez, na petra 'ta ! da welout e barrezianiz — evit rei d'ezan da anaout eo gortozet gant an Aotrou Aluzenner en unan eus saliou ar patronaj.

— An Aotrou Aluzenner a zo e dro da regali, Aotrou Person....

— Mat ! mat ! eomp neuze. Eun dra vat eo ober plijadur d'an holl...

Ha gant eur mousc'hoarz fin, Aotrou Person Erge a gemer hent ar patronaj.

Dre ma 'z eont etouez an dud e vezont salutet hag e komzont ouz hemañ, ouz hennont, e vez goulennet kelou eus ar familh, e vez komzet eus an amzer.

Gwelet o deus meur a zremm dianav ha n'eo ket marz ! Kement a dud eus Kemper hag eus al lec'hiou all !

— N'ho peus ket gwelet, Aotrou Person ? mestr-skolaer lik Kerdorozenn a zo deut ivez...

— A ! n'hen anavezan nemet dre ar pezh em eus klevet diwar e benn gant an eil hag egile, n'eo ket lakaet evit eun den... katolik, a gav d'in.

— Badezet eo bet, met troet en deus kein d'ar relijion abaoe m'eo bet er skol kenta-uhel. Setu ar pezh em eus klevet gant va mignon, kure Kerdorozenn. E ziskouezet en deus d'in eur yaouvez m'edo ouz ober eur bale war an hent gant e vaouez hag e verc'h.

Pemp munut goude e vez klevet eur suterez.

Echu an ehan hag emeur o vont da adkregi.

An taol-mañ eo an hini diweza. C'hoari a vezo adarre met ar gounid a seblant beza da Vreiz-Uheliz. Da vihana ar re-mañ a ziskouez eur fizians bras.

A-vec'h m'eo digoret ar c'hoari emañ ar « Baotred Dispont » en o gwella. Ar « Yaouerien » n'o deus ket bet amzer d'en em lakaat mat en abadenn ma weler araogerien an Odet dirak o fal Ar polotr a zo gant Lan Gourmelen. Eun taol hag a son hag ar polotr evel eun tenn a ya er roued.

Yaouerien : 1 ; Paotred Dispont : 1.

An diou vandenn a zo keit ha keit.

Ar mousc'hoarz a zo deut war dremm unnek ar vilin-baper.

An arvestourien ne vankont ket d'o c'hennerzi a-hend-all dre hopal ha dre strakal o daouarn.

Kaer o deus ober avat, ar polotr a zo hogozik atao war o zachenn. Gwenole a c'hoari etre ar varennou evel eul leon en eur gaouet.

Pemp, c'houec'h gwech dioustu e vir ouz ar polotr mont d'ar roued. Ar « Yaouerien » a zo hegaset kenañ. Kaout a rae d'ezo kaout an trec'h hep re a boan. Dreist-holl goude ar c'hoariadenn genta o deus diskouezet enni beza ar re greñva hag ar re varreka war ar polotr !

N'eus penn-kaoz da virout outo da verka, nemet ar gwidoroc'h paler-se a glevont an arvestourien hen gervel : Gwennole, Gwennole !

Tostaat a ra ar fin.

Hag ar c'hoari a chom atao dirak koadou an Odet. Gwennole ne ziskoueze ket re beteg-hen beza skuiz. Met bremañ e vez gwelet o kas alies e zourn d'e benn.

Ar c'habiten Lan Gourmelen en deus gwelet ez a e baler war fallaat. Ret eo, kousto pe gousto, dont war e sikour. Dont a ra eun tammig a-dreñv. Eur pennadig goude emañ ar polotr gantan hag a-dreuz ar c'hoarierien eneberien e kerz etrezek pal ar « Yaouerien ». Lakaet en deus en e benn e c'hounezo ar pal-mañ. Tremenet en deus an hanterourien. Dirak ar warlerc'hidi e rank servija ar polotr d'e geneil, an askeller-kleiz, deut d'e burchu. Hemañ a ro eun taol troad ha Lan dirak ar pal gant ar polotr.

Ar paler a zo war-evez, met Lan a ra an neuz da skei a-gleiz ha d'an ampoent e sko a zehou. Ar paler a zo aet a-gleiz, ar polotr a dremen dindan ar varrenn a-zehou hag a ya er roued.

« Yaouerien », 1, « Paotred Dispont », 2.

Evel eun tarz-kurun ar strakadenn-daouarn a son e traonienn an Odet...

« Brao-brao ! Lan.... »

Prest goude, e vez klevet an taol sut echui.

An trec'h a zo d'ar « Baotred-Dispont ».

Kenstrivadeg polotr-troad patronajou Breiz a zo gounezet er bloaz-mañ gant paotred an Odet.

Araok mont kuit, Kemperiz ne ehanont ket da grial :

« Brao-brao ! Paotred-Dispont ! brao-brao !

E kreiz trouz kefluskerien ar motoiou, ar c'hirri-dre-dan e vez klevet an dud oc'h anzav :

« Aet eo ar maout gant ar « Baotred-Dispont » met n'eo ket int-i eo bet ar re varreka.

M'o deus gounezet eo dre ijinerez, dre droiou ouesk ar paler. »

Nag eur paotr gwevn Gwennole Naour !

II. Eun den o klask e hent

Gwennole Naour, paler ar " Baotred Dispont ", a zo eur paotr yaouank a zaou vloaz war 'n ugent.

Graet en deus e studi e skolaj sant Erwan e Kemper. D'e zaouzek vloaz en deus kollet e dad. Mari Naour, e vamm, gant ar « bansion » a roe d'ezi an Aotrou Keraudren abaoe maro e gwaz, a c'hallas, dre sellout piz ha dre ober gant nebeut a dra, kenderc'hel da baea skol Gwennole ha beva er gêr Soazig hag hi. An holl vugale all a zo dimezet amañ hag a-hont. Unan a zo e Paris, unan all e Beyrouth, dimezet eno gant eur plac'h yaouank, eur varonitez en doa anavezet epad e amzer soudard. Eur verc'h all a zo dimezet d'eun archer hag a zo o chom bremañ e kêr Rouen.

Echu gantan e glasou ha bet d'ezan e « vrevet » hag e bec'hlore (bachelouriez), Gwennole en doa goulennet beza digemeret er c'hloerdi-bras.

Kreñv en e studi n'oa ket kreñv, gwa heñ ! e keñver ar c'horf. Meur a wech epad e glasou en doa ranket chom da ehana.

Bremañ al louzaouer a zifenne outan a-grenn kenderc'hel gant e studi dreist-holl gant ar studi kalet, skiant-ar-furnez ha skiant-Doue.

« Ne vezo ket evit harpa », a skrive al louzaouer da Rener ar c'hloerdi-bras.

Ha Gwennole, doaniet holl, a rankas klask eun hent all ; ha koulskoude, heñvel e kement-se ouz e genvroad brudet Yann-Per Kalloc'h, n'oa ket evit soñjal en eur stad vuhez all ebet nemet e hini ar beleg.

Meur a wech en deus lennet ar werz *Fiat*, skrivet gant Bleimor :

P'en dé gwir eman maro hunvre va yaouankiz...

Hag hoc'h eus va luet e roued ar gwall-euriou...

P'e gwir eman aet kuit, gant ar mor, stur va lestr..

P'e gwir ez oun brevet hag e ouelan,.. o mestr

Ra vezot benniget 'vit ar pezh ho peus grêt...

Chom a reas bloaz er gêr da ziskuiza e-kichen e vamm hag e c'hoar Soazig.

Evit e zidui hag en hevelep amzer evitan da c'hellout sikour e vamm da lakaat eun dra bennak a gostez evit ar gozni pe an deveziou fall, Gwennole a gemeras labour-bureo er vilin-baper.

Peurliesia ar paperiou a veze kaset d'e di hag eno e labour e aesoc'h ha pa gare.

An ti eo an hini a zo er penn all d'ar gêriadenn, e kreiz. Eur gegin, eur sal-digemer hag eur gambr a zo d'an traon. Er solier ez eus peder gambr etre. Daou wele hag eun daolig a c'hell mont e pep hini anezo.

Gwennole a vez o labourat en unan eus ar c'hambreier troet ouz ar C'hreisteiz hag o kousket en eben. En tu all Mari ha Soazig o deus pep hini he c'hamb.

Bloaz a dremenas evelse....

Gwennole en doa naontek vloaz. Hag e roas eur menoz a oa pell 'zo en e benn da anaout d'e vamm. Houmañ ne asantas ket dioustu. Arsa ! mont da soudard gant ar yec'hed en doa ! Kuitaat e vamm ! Ha ma kouezfe klañv ?

Ken brao e komzas Gwennole hag e abegou a ziskoueze beza kenkoulz ma roas ar vamm hec'h aotre, o pedi avat santez Anna en he c'halon da virout na ve kemeret he mab.

Poan en doa bet Gwennole, e gwirionez, evit beza lakaet mat evit ar servij.

Al louzaouerien pe ar Majored a heje o fenn... En-diwez, unan anezo a

lavaras :

— « N'eo ket gwall greñv ar paotr. Met kleñved ebet n'en deus. C'hoant em eus da gredi e ray ar vuhez soudard mad d'e gorf... »

Hag e voe kemeret.

An embregerez, an aer vat, ar boued' kreñv a reas, end-eeun, ar brasa mad d'e yec'hed.

Desket en doa skol ar soudard Eun embreger mat oa, rak unan eus ar re wella oa eus patronaj ar Galon-Sakr.

An ofiserien a welas dioustu ez oa danvez eun ofiser er soudard-se.

Klasket e voe e gas da Saint-Cyr pe da vihana da Saint-Maixent. Nac'h a reas a-grenn. Ne vije ket an arme e vicher.

Tri bloaz goude, end-eeun, an adjudant Gwennole Naour a guitae ar rejimant daoust d'ar pezh a lavare ar c'habiten d'ezan : « Chom c'hoaz hag a-benn c'houec'h miz ac'han ez out is-letanant, me hen assur d'it ».

Ne chomas ket. Perak ?

Dre m'oa savet e penn Gwennole ar youl da sklerijenna e genvroiz, d'o sklerijenna dre ar skol, dre ober skol gristen ha skol vrezonek.

Lennet en doa epad an tri bloaz servij holl kannadou Breiz. Studiet en doa a-zevri ar brezoneg ha zoken e eil-yezou.

Gwelet en doa penaos ar brezoneg a yae da get etouez ar Vretoned hag a-unan gant ar brezoneg, meur a dra all : ar gwiskamantou, ar gizioù ha kement tra a ra broadelez Breiz.

A-wechou, ar feiz, gwall-evurusamant, a yae kuit da heul an traou all.

Gwelet mat a rae e ranked digeri al labour, labour ar brezoneg dre ar skol. Dre ar skol eo e vefe graet al labour padus.

Chom a reas er gêr.

Da c'hedal eur « plas » ez asantas labourat adarre evit ar vilin-baper.

Meur a c'houlenn a deuas d'ezan etre miz even ha miz gwengolo. Sant Erwan Kemper a ve laouen ouz e zigemerout egiz kelenner pe enseller. Sant-Loeiz Brest a ginnige d'ezan ar skiantou hag an embregerez. Nac'h a reas ar goulennou-se ha meur a hini all.

Gwelloc'h e kave mont war ar maez, en eur barrez vrezonek, en eur skol izel. Eno e kavje tro da ober skol diouyezek. Rak c'hoant en doa da ziskouez, goude meur a hini all, eo ar « reolenn diouzek » gouest da lakaat ar vugale da vont buanoc'h war araok e galleg eget ar « reolenn eeun. »

Pa voe anavezet e venoz e voe kinniget plasou d'ezan e Bro-Leon. Nac'h a reas adarre. Gwelloc'h e kave chom e Kerne. Kerne he doa :matreze muioc'h a ezomm eus skoliou kristen eget Leon.

Etretant ar skoliou a zigoras er bloaz-se.

Gwennole a reas neuze eur c'hontrad gant an Aotrou Keraudren evit entent ouz ar bureo epad bloaz.

Diouz ma lavare mestr ar vilin-baper, al labour a veze graet peurvat. Kinniget e voe da Wennole chom e Odet hag e vije paeet hanter muioc'h.

Gwennole a c'houlennas eun termen araok respont. Ha da c'hedal ez ae bemdez diouz an noz da dremen e amzer er patronaj gant an aluzenner ha gant e genvroiz.

Gwelet hon eus penaos oa karet gant en holl ha penaos eo heñ eur c'hoarier dispar e keñver ar polotr-troad.

Prometet en deus Gwennole rei e respont da fin miz mae. Boulc'het mat eo ar

miz dija ha goulenn ebet ne deu c'hoaz. Koulskoude an Aotrou Aluzenner e bodadegou beleien en deus komzet eus Gwennole Naour hag eus e ampartiz war ar brezoneg.

Gwennole, end-eeun, n'en deus ket kollet e amzer er bloaz-mañ. Skrivet en deus e daou pe dri gannad a-hed ar bloaz. Kempennet en deus levriou diou-yezek : yezadur, lennegez.

Da fin miz mae, pa ne deue goulenn ebet, Gwennole a roas e c'her met gant an diviz e vije freuzet ar c'hontrad o lakaat e teufe eur goulenn araok digor ar skoliou. Goude an amzer-se e ve sinet da vat.

III. Person nevez Kerdorozenn

An Aotrou Berthou, person koz parrez Kerdorozenn en doa goulennet beza diskarget eus ar barrez en abeg d'e oad ha d'e skuizder.

Aotrou Eskob karet Kemper ha Leon a asantas, daoust ma vanke beleien d'ezan. Gwir en doa an Aotrou Berthou da zilezel e garg ; gounezet en doa eun tammig diskuiz war an douar-mañ evit kempenn gwelloc'h e ene evit diskuiz peurbadus ar baradoz.

An Aotrou 'n Eskob a anvas en e lec'h eur C'hernevad, kure neuze e Leon.

An Aotrou Herri en doa d'ar mare eiz vloaz ha daou-ugent. Beleget abred, ez en em gave war renk ar bersoned abretoc'h eget kureed e oad.

E Kerdorozenn ez eus diou skol lik hag eur skol gristen nemetken, skol ar baotrezed. Houmañ a zo bet savet a nevez 'zo gant an Aotrou Berthou ha kement-se eo en deus peurskuizet ar person koz. Diskleriet en deus an Aotrou Berthou d'genvreur, ar person nevez deut d'e gaout :

— Me em eus savet eur skol gristen evit ar paotrezed. D'it te eo da sevel unan evit ar baotred.....

— Ya. Lavarout mat a rit, Aotrou Berthou, met gweneg ebet n'em eus ha den da gemerout ar skol-se, o lakaat e c'hallfen he sevel....

— Me, kennebeut n'em oa ket kalz a dra evit sevel skol ar paotrezed.... An Aotrou Doue a deu war sikour. Aotrou Person, bezit fizians.... »

An Aotrou person koz ne gredas ket adlavarout : « ha te a zo eun den entetet war an aferiou hag eun den pennek... dont a ri a-benn eus an taol... » n'hel lavaras ket met hen sonjal a reas.

Pa 'z eo bet o kaout an Aotrou 'n eskob, person nevez Kerdorozenn en deus bet an hevelep urz.

— Aotrou Person, ho kas a ran d'eur barrez hag a zo labour da ober enni. Tud vat a zo enni, tud ha n'int ket re vat a zo ivez. Ar pezh ho peus da ober eo digeri al labour dre sevel eur skol evit ar baotred. Ya, ya, goût a ran n'ho peus gweneg ebet... An ebestel kennebeut n'o doa gweneg ebet.... Sant Per a zo antreet e Roma egiz eur beajour, ar penn-baz en e zourn. An ebestel, tud paour-ran, o deus gounezet ar poblou da Jezuz-Krist, o mestr. Sant Per a zo deut da veza eskob Roma.... Kit gant fizians. Ho pinvidigez a vezo bennoz an Aotrou Doue ha va hini-me a roan d'eoc'h a greiz kalon... »

Petra ho pije graet o lakaat e vec'h bet e lec'h Aotrou Person Kerdorozenn ? Moarvat ar pezh en deus hen graet. Poket en deus da zourn e eskob, d'an dourn en deus skuilhet bennoz Doue warnan ha prometet en deus e rafe hervez e c'halloud penn-dabenn.

An Aotrou 'n Eskob en deus mousc'hoarzet. Anaout mat a ra e zen. M'en deus lakaet en e benn ober al labour, na den ,na diaoul ne c'hello herzel outan....

Hag ar person nevez en deus klasket arc'hant en deus klasket tud.

An arc'hant a deu a-nebeudou. An dud ne deuont tamm ebet. An eil goude eben, ar gevredigeziou breudeur skolaerien o deus respontet :

— N'hon. eus den ebet da rei, ha n'hon devo ket zoken ac'han da bell. N'hon eus ket awalc'h a skolaerien evit ar skoliou hon eus kemeret ar garg anezo a-vremañ....

Ar person en deus skoet war doriou all. Digor ebet n'en deus bet.

Eun devez, o leina e skolaj Sant-Erwan e Kemper, e lavar e boan d'ar Renner.

— Anaout a ran unan, eme ar Rener, hag a c'hallfe ober hoc'h afer, met aon em eus n'en defe prometet d'an Aotrou Keraudren chom er bureo da labourat evitan. Henez, diarvar eo, a ve ho ten. Rak c'hoant en deus da ober skol, skol izel en eur barrez war ar maez, skol diouyezek. Gwad ha spered a zo hag eun den hegarat eo ouspenn.... Met asanti a ray heñ ? Ne gredan ket lavarout d'eoc'h mont d'e gaout gant aon na rafec'h eun dro wenn muioc'h....

— Tro wenn pe tro vat, mont a rankan ,rak kaout a rankan.

Ha person nevez Kerdorozenn a zo deut da Odet...

An Aotrou Herri a gar mont war eeun d'ar pal. Pa 'z eo antreet e ti Mari Naour, e c'houlenn dioustu :

— Arsa, mamm, c'houi ho peus eur mab hag a ve gouest da zerc'hel eur skol ?

— Eur mab em eus e gwirionez, Aotrou Person, hag a zo bet ano gantan mont da ober skol. Bremañ avat n'ouzon ket petra 'ray. An Aotrou Keraudren en deus kinniget d'ezan chom er bureo.... hag eur bae vat en deus prometet.

— Maouez, c'hoant em eus da welout ho mab dioustu.

Hag epad ma 'z a Soazig da gerc'hat Gwennole, e klask ar person lakaat ar vamm ouz e gostez.

Moarvat n'eo ket deut re fall a-benn eus e daol rak klevet e vez ar vamm o tiskleria, pa deu Gwennole ha Soazig en ti :

— Me ne c'houlennan ket gwelloc'h, Aotrou Person, met an dra-se eo dreist-holl afer va mab.

— Te eo Gwennole Naour ? eme ar person, hag e kinnig e zourn d'ar paotr yaouank o tont en ti hag e sell a-bik en e zaoulagad.

— Ya, me eo, Aotrou Person, eme Gwennole, mousc'hoarzus eun tamm dre ma soñj moarvat : setu a-mañ eur beleg hag en deus eun aer dizaouzan kaer avat !

— Kleo, paotr yaouank, ezomm em eus ouz eur c'hrennard evit ober skol e parrez Kerdorozenn. Me a zo o paouez beza anvet da berson eno. Paour oun, paour-ran. N'em eus netra, na ti nag arc'hant. N'em eus nemet eur c'harr-di hag a c'hallfe beza kempennet egiz eur c'hlas, da c'hedal gwelloc'h. Ouspenn, ne vezo ket bras, sur oun, niver ar baotred er bloaz-mañ ha marteze er bloaveziou warlerc'h, rak an dud a zo troet kenañ war ar skoliou lik ha suja a reont d'o skolaerien, unan anezo socialist (*kevredigezour*), unan all komunist (*boutiner*). Eun den kalonek em eus ezomm eta.... ha te eo va den ?

Gwennole a chom eur pennad da brederia, Muzellou an Aotrou Person a finv. Ne ve ket souez e ve o pedi sent ha sentezed Breiz, patroned Kerdorozenn da zont war e sikour.

En diwez Gwennole a lavar :

— Aotrou Person, Hor Salver Jezuz-Krist a zo ganet en eur C'hraou, ha bremañ n'oar ket evit niveri e ziskibien. C'houi a zigor ivez ho skol en eur..... c'hraou, fizians em eus ho pezo ivez kalz paotred skol..... eun devez bennak. Bennoz Doue da veza kontet warnon-me. Gant sikour Doue ha gant nerz va bolontez breizek, me a vezo ho ten.....

An Aotrou Person, end-eeun, en deus kavet e zen. Sevel a ra diwar e gador hag an dour en e zaoulagad e pok start start d'ar paotr yaouank.

— Mat eo ! emezan. Klev mat bremañ. N'em eus ket kalz a dra, met ar pezh em eus a vezo rannet. Ar presbital a vezo da di evel va hini-me, da c'hedal ma c'hellimp kaout eun ti evit da vamm, Soazig ha te.....

Pa 'z eo aet an Aotrou Person kuit, goude beza debret krampouez gwiniz hag evet eur banne jistr hag eur banne kafe, ar vamm a c'hourdrouz eun tammig he mab, daoust ma kav d'in eo lorc'hus gant e respont :

— Perak az peus respontet ker buan ha perak az peus asantet d'eur seurt afer !
Koll da c'hounid amañ evit mont da labourat evit... netra!

— Va mamm, gwelet em eus e vezo poan ez eus eur barrez da c'hounit da,
Zoue ha da Vreiz. En abeg d'ar boan-se, end-eeun, em eus asantet rak e lec'h ma vez
poan eno eo e vez bennoz Doue. Gwir eo, c'houi ho pezo poan ivez rak ho kuitaat a
rankin, met Soazig a chomo ganeoc'h ha neuze alies e teuin d'ho kwelout da c'hedal
ma vezo kavet eun tiig e Kerdorozenn.

Mari Naour ne lavar grik. Petra he dije hi lavaret ? O lakaat e ve bet e lec'h he
mab he dije graet ha lavaret eveltan.

Eur pennad ar paotr yaouank hag an diou vaouez a chom dilavar. Evit echui
dre ar bedenn eur c'hontrad ken kalet ha dreist-holl ken karantezus, ar vamm a lavar :

Doue ra viro ar vugale kristen !

Doue ra viro dreist-holl bugale Breiz !

Ha Gwennole a ya da gemerout e c'her digant an Aotrou Keraudren.

IV. Kraou Bethleem

D'ar sulvez araok ma voe digoret ar skoliou er bloavez-se, Aotrou Person Kerdorozenn a ginnige e vestr-skol d'ar barrezianiz.

Gwennole a oa gant ar benveg-muzig. Anat d'eoc'h e voe sell outan epad an oferenn hag evit lavarout mat, eun dudi oa klevout penaos ez eile ar c'han hag e kane e-unan.

An Aotrou Person en deus kestet dre ar barrez. Gwelet en deus ar familhou. Met an dud o deus ginet. Pennou ruz ar barrez o deus lavaret e pep lec'h : arabat mont da skol ar veleien.

Ar familhou pinvidik n'o deus ket kredet rei.. Ar vugale n'int ket bet prometet.

Ar politikerezh, ar politikerezh fall a zalc'h war an dud. Ar re vat o deus aon rak an dud fall.

An Aotrou Person en deus hen gwelet mat en devezioù tremenet. Gwelet en deus eo heñ kemeret eun tammig e pep lec'h evit an « enebour », an hini n'eo ket mat senti outan en traou na sellont ket ouz an iliz hag ar sekretiri...

N'eus fors ! an Aotrou Person en deus fizians da zont a-benn eus e dud. Evit e sikour en deus kavet, en eur erruout er barrez, eur c'hure leonat, penn-kalet, met dous evel eun oan. Henez ivez abaoe m'eo deut er barrez en deus lakaet en e benn gounit speredou ha kalonou Kerdorozenniz.

Karet, gwelet mat ,bepred laouen, an Aotrou kure en deus kalz mignoned er barrez, eun nebeut a-wel ha muioc'h e-kuz.

An Aotrou Person en doa displeget dirak e vestr-skol degouezet pemp devez araok pesort digemer en doa kavet er familhou.

— Lavaret ho peus d'in, Aotrou Person, e vije tenn an abadenn. Doue hor sikouro !

Bremañ petra 'ray ar gerent kristen eus ar barrez ?

An Aotrou Person en e brezegenn en deus trugarekaet ar re o deus graet digemer laouen d'ezan, ar re o deus roet o aluzen. D'an holl e ro da anaout an dever a bouez bras en deus pep kristen da zeski e relijion penn-da-benn hag e keñver pep danvez eus ar skiantou. Ar gerent eta o deus da respont dirak Doue eus kelennadurezh o bugale.

Eun dra sklaer ha gwirion eo en devez hirio n'eo ket skoliou poblek ar c'houarnamant evit rei d'ar gristenien ar gelennadurezh a dleont kaout, ar gelennadurezh kristen.

En abeg-se e rank ar gatoliged sevel skoliou all gant o arc'hant o-unan, goude sikour paea ar skoliou lik n'o deus ezomm ebet anezo. Met gwelloc'h eo c'hoaz paea diou wech, da c'hedal ma vezo roet hor gwir d'imp, eget chom hep savetei eneo hor bugale. Hor skoliou n'int ket savet enep ar skoliou lik, met en o c'hichen evit rei tro d'ar gatoliked da rei ar gelennadurezh kristen d'o bugale.

— « Rak-se, va breudeur ker, arc'hoaz ni a c'hedo ho pugale er skol gristen war hent chapel an Dreinded. »

En abardaez-se e tremenas kalz a dud war hent chapel an Dreinded .C'hoant a oa da welout ti ar skol gristen.

Paour kaez ti ! eur c'harr-di, pemzek troatad a hirder ha nao a ledander. Daou

brenestr a oa bet digoret er voger ouz tu an hent, Eur bureo paour evit skolaer er penn all d'ar sal ha pemp pe c'houec'h taol-skol evit ar baotred.

A-zioc'h an nor eur skritell livet warnan portred eur manac'h gant ar geriou-mañ dindan, skrivet teo hag uhel :

« SKOL GRISTEN SANT GWENNOLE »

An Aotrou Person a oa falvezet gantan rei an ano-se d'ar skol nevez, da genta evit goulenn skoazell ar manac'h brudet en doa sikouret ober eus Kerne eur c'horn bro katolik, da eil evit trugarekaat an den kalonek a grede lakaat e spered hag e yec'hed e servij bugale ar barrez.

Ar wech kenta m'en deus gwelet an ti-skol dreist-paour-se, Gwennole n'eo ket bet evit mirout da lavaret d'ezan e-unan met kreñv awalc'h peogwir an Aotrou Person e glevas :

— Kraou Bethleem !... Gwell a se !

— Ya ! Gwell a se, Gwennole. Kraou Bethleem a zo savet warnan bremañ eun iliz vras ha kaer, iliz santez Katell. Fizians em eus e vezo savet amañ ivez war gorre ar c'hraou-mañ eun ti-skol kaer.... en dervez ma plijo gant Doue hag ar c'henta ma her gallimp. Ne gav ket d'it, Gwennole ?

— Eo, Aotrou Person, eus kraou Bethleem eo deut evit an dud ar sklerijenn hag ar peoc'h. Eus an tiig-mañ, da c'hedal ma vezo graet brasoc'h ha kaeroc'h, em eus fizians da skuilh eun nebeut bannou sklerijenn a wirionez ha tommder ar garantez, e spered hag e kalon Kerdorosenniz.

An dud o tremen dirak an ti-skol paour o deus hejet o fenn. Lod evit ober goap, lod all evit diskouez dismegans. Kredi a ran en deus meur a gristen ha meur a gristenez ruziet eun tammig ivez dre m'o deus soñjet moarvat :

« M'am ije me graet va dever, e vije bet bravoc'h ha frankusoc'h an ti-skol kristen..... »

An Aotrou Person ha Gwennole a ya, goude gousperou, betek an ti-skol. Da belec'h ez aint nemet di pa ne soñjont, hirio dreist-holl, nemet en tiig karet-se.

P'emaint o vont er c'hourt bihan a zo dirak ar sal e tremen dirazo ar mestr-skolaer lik, an Ao. Flaouter, gant e wreg hag e verc'h Mona. An diou vaouez a bleg o fenn d'an Aotrou Person ha Gwennole en deus merzet n'o deus ket int-i aer drouk. Kaout a ra d'ezan zoken he deus ar plac'h yaouank sellet mat outan met ne c'hoar ket pe he deus mousc'hoarzet pe he deus diskouezet digas.

An Aotrou Person a ro dioustu da anaout pesort den eo ar mestr-skolaer, eun den lik penn-kil-ha-troad. Badezet eo, em eus klevet lavarout, met ne gred mui e Doue. E wreg koulskoude, Anna, hag e verc'h, Mona, a vez en oferenn-bred bep sul. An tad a garfe mirout outo met ar verc'h eo a zo mestrez en ti hag ar verc'h a zo pennek evel an tad. An tad a rank plega rak karout a ra kenan Mona.

Falloc'h eo c'hoaz an daou skolaer a zo gantan; an Ao. Poulpriz, kevredigezour pe socialist, hag an, Ao. Bourdellec, boutiner pe komunist. An daou-se eo a rankomp da gas kuit araok pell ha mont a raint en devez ma teuy bugale Kerdorozenn d'ar skol-mañ Da c'hedal, bezomp war evez, rak diaes bras e kavont gwelout ar skol-mañ o tigeri. Pep tra a raint evit derc'hel paotred ar barrez en o skol. C'hoari mat a rankimp eta, ma fell ganimp kaout an trec'h.

Al lun warlerc'h.

Araok eiz eur an Aotrou Person ha Gwennole a zo war ar c'hourt, er skol gristen, o c'hedal ar vugale.

Da eiz eur n'eus den ebet c'hoaz.

Da eiz eur ha kart, tri baotr, lentik holl, a deu er c'hourt

— Na ho pezit ket aon, paotred, eme an Aotrou Person o vont daveto ha dre o c'has betek ar c'hlas.

An Aotrou Person ne anavez ket holl vugale ar barrez c'hoaz. Setu ma c'houlenn o ano digant an tri baotr-skol.

— Te, ar brasa, pe ano az peus ?

— Kere Yann.

Mat eo ! hag ar person a wel dioustu eo bet skoliet Yann gant al liked. An ano-badez ganto a vez lakaet da eil. Gant ar gristenien, er c'hontrol, e vez lakaet da genta, dre m'eo an hini talvoudusa...

— Ha te, va faotr ?

— Kere Perig....

— Mat ! mat ! ha te, an hini bihana, pe ano az peus te ?

— Kere Youen, eme ar paotr gant eur vouez gros ha gant eun doare mouzet.

En devez-se ne deuas den ebet ken. En deveziou warlerc'h ne deuas ket muioc'h.

Gwennole en doa tri baotr-skol, tri vreur : Yann, Per ha Youen, hag an tri vreur a oa degaset dre m'o doa ar gerent imor ouz ar mestr-skol lik.

— Arsa ! ma n'eo ket eun dra direiz ! Ar mab Yann, oajet dija a drizek vloaz, n'en deus ket bet e « santificat » ! (testeni-studi). Anat eo n'en deus ket ar mestr-skol entetet mat outan rak m'hel lavar d'eoc'h e gwirionez, Yann a zo eur paotr speredek....

Allas ! ar paotr speredek n'eo nemet eur penn azen. Petra ober ?

Gwennole a glask evelato lakaat Yannig da zeski eun dra bennak. Marteze, dre boulza warnan, e vo gellet e lakaat da gaout an testeni studi !

An daou vreur all n'int ket speredekoc'h. Evito ez eus amzer. Yann eo a rank beza degemeret en arnod testeni-studi evit diskouez eo kerkoulz ma n'eo ket gwelloc'h ar skol gristen eget ar skol lik.

Na pebez trec'h ma ve degemeret ! Eur paotr lakaet sot evel eur pod gant al liked ha degemeret goude beza bet bloaz er skol gristen !

Ha Gwennole a gemer poan gant ar paotr hag e zaou vreur. Poan, poan dilavar en deus o klask lakaat an distera tra en o fenn.

Ar vamm a c'houlenn eur wech an amzer d'ar sul.

— Ha Yannig ? mont a ra en dro gant e « santificat » er bloaz-mañ ? Resevet e vezo, sur oun. Ha mat e vezo graet da vistri an ti-skol lik.

— Fizians em eus, maouez, fizians em eus e vezo digemeret, da vihana hon daou e c'hoariomp diouz hor gwella.

V. Ar gounidou kenta

Den ebet ne goll e amzer e presbital Kerdorozenn. Gwennole epad ar sizun a ra skol. Ar veleien e pep tu ar barrez a glask gounit ar gerent d'ar skol gristen. Mont a reont e pep lec'h. Gwelet e vezont amañ hag a-hont atao war o meno o welout tud klañv ar barrez. Ha tud klañv a zo er barrez end-eeun muioc'h eget na sonj an dud o-unan. Kerdorozenniz, re anezo, a zo taget gant kleñved ar skoliou dizoue.

D'ar yaou, ar veleien a ra katekiz.

Goude ar c'hlas, Gwennole a zalc'h ar baotred evit deski d'ezo kana hag ober diouz al lidou-sakr.

A-benn eun nebeut sizuniou eo deut a-benn da zeski kana en eun doare dereat. Araok fin ar bloaz, ma kendalc'hont, meur a hini anezo a c'houezo lenn mat ar muzig.

Plijadur o deus o kana hag hel lavarout a reont d'o zud.

D'ar sul eo eun dudi evit an daoulagad arvesti ouz ar baotred o vont hag o tont, sioul ha dic'hoarz, er chantele, eun dudi evit an diousskouarn klevout ar ganerien bihan renet gant ar mestr-skol kristen.

Gwennole, pep hini hen gwel, a laka muioc'h mui an dud ouz e gostezenn.

Met an eneberien a zo war evez.

N'int ket gouest da virout ouz ar baotred da vont d'ar c'hatekiz d'ar yaou. Klasket e vezo o distaga diouz ar c'hlas-kan goude ar c'hatekiz.

Eur merc'her eta e voe roet da anaout d'ar vugale er skol lik gant ar mestr-skolaer e-unan e vije klas-kan er skol goude ar c'hatekiz. D'ar re a deufe e ve roet kaierou-muzig ha levriou da zeski muzig. Egiz prizioù e ve roet binviou-muzig, e miz gouere.

Er yaouvez warlerc'h e teuas eun ugent bennak. Desket e voe d'ezo kana ar *Marseillaise* ha zoken an *Internationale*, rak an Ao. Bourdellec eo a oa bet karget ouz ar c'han. Ar re all ne c'houient ket ar muzig, ha Mona pa voe goulennet diganti ober ar c'hlas-se hez-unan he doe diskleriet a-grenn :

« *Ne rin ket rak d'ar yaou ne vez ket graet skol-kan er skoliou lik all. Ne garan ket e ve klasket enebi ous ar mad o deus c'hoant ar re all ober... »*

Anat mat oa bet da bep hini ne vije biken Mona a-unan gant al liked. Ha koulskoude graet he doa he studi er Skol-Uhel ! Eno, end-eeun, eo he doa kemeret ar ratoz-vat d'en em ziskouez kristenez vat. Kavet he doa eno mignonezed katolik hag a lenne kannad an *Davidées* dre guz, rak difennet oa outo hen reseo.

Mona a gendalc'has da vont en iliz goude m'oa deut eus ar skol-uhel daoust da gounnar he zad. Anna Flaouter a gavas neuze an nerz da vont d'an oferenn bep sul da heulia he merc'h Mona. Anna a zo eur vaouez kalonek met lentik-holl.

Ne lavaran ket eta ne ve ket Mona eun tammig a du gant Gwennole....

Pa o deus ar gerent klevet o bugale o kana an *Internationale* eo bet dare d'ezo pennfolli ! Bugale mont da gana petra !

Tud keiz ! ar pezh n'eo ket mat evit ar vugale a zo mat evit o c'herent ? Ar wazed a vot evit ar re ruz....

N'eus fors ! adalek an devez-se e voe freuzet ar c'haierou-muzig hag an holl vugale a chomas e skol-gan ar skolaer kristen, ha laouen, rak abaoue ne choment ket e klas-kan ar skolaer kristen, d'ar sul, ne c'hallent mui kana en iliz a-unan gant ar re all. N'o doa ket desket...

Setu ma klaskas ar skolaerien lik traou all.

Bep yaou abardaevez an Aotrou Kure a yae da ober eur bale gant paotred ar patronaj, da lavarout eo, gant holl baotred ar vourc'h hag ar pep brasa eus paotred ar

maeziou tost d'ar vourc'h.

Kement-se n'oa ket mat ! Arabat e chomfe ar vugale etre daouarn ar veleien !

An Ao. Poulpriz en deus asantet mont bep yaou, goude lein da ober eur bale. Er yaouveziou kenta e kavas eun daouzeg bennak da vont gantan dre m'en doa prometet madigou ha c'hoariou.

Gwennole a roas da anaout e vije hiviziken bep yaou, epad ar valeadenn, eur c'hlas-kan hag e vije desket al lidou-sakr d'ar gurusted. Ar re ne vijent ket er valeadennou ne vefent ket eta kurust er suliou warlerc'h.

Araok an trede yaouvez ne chome den ebet adarre gant an Ao. Poulpriz hag hemañ a glaskas tremen e yaouveziou e giz all... Prest goude e timezas.

Ar skolaerien lik evelato n'oant mui dinec'h.

— Al lakepod-se, ma vez lezet, a deuy a-benn da lakaat an holl baotred da vont davetan.

— N'ho pezit ket aon, va zad, eme Mona. Ganeoc'h c'houi eo emañ an arc'hant, ar maer, an ti-kêr. En tu an troad emaoe'h. An den-se a deuy da skuiza...

— Gwir eo, Mona, ne vezo ket evit harpa.

Ha Mona koulskoude, hep gouzout perak, a garfe e welout o kenderc'hel gant e labour hag e c'hounidou.

Bep tro ma vez lavaret eun dra bennak enep da Wennole, Mona a deu war e sikour hag an Ao. Flaouter a guz e imor, gant karantez evit e verc'h.

Ar mestr-skolaer lik a gar e verc'h dreist pep tra. Kement tra a ra hi a zo mat, nemet pa gomz eus ar relijion. Evit kaout ar peoc'h, rak gouzout a ra ne gilo biken Mona war ar poent-se, ne ziskouez ket e zisplijadur.

Penaos eo deut Stephan Flaouter da ober skol en eur barrez diwar ar maez heñ hag a oa brudet da veza unan eus kelennerien gouizieka ar vro ? Dre m'en doa lavaret al louzaouer eun devez d'ezan :

— Aotrou Flaouter, mall bras eo d'eoc'h diskuiza, re e labourit ha diskleria a rankan d'eoc'h, e gwirionez, ma kendalc'hit, emañ ho korf o vreina er vered araok tri miz ac'han

Goulennit eta eur skol war ar maez evit kaout aer yac'hus ha nebeutoc'h a labour eget e penn skolaj-lik Kemper.

An den brudet Stephan Flaouter a roas e lec'h da unan all hag a deuas e-unan da Gerdorozenn.

An Ao. Flaouter a oa eur Breizad, met eur fals-hini. Troet en doa kein d'e vro hag en hevelep amzer d'e feiz. Alies, end-eeun, ez a ar feiz da heul danveziou ar vroadelez.

Deut oa an Ao. Flaouter da veza gwsa dizoue a gaved etouez kelennerien lik ar vro. Heñ eo a veze galvet bep gwech da brezeg, er bodadegou lik, enep ar relijion.

Dimezet oa bet e Kemper gant merc'h eun den uhel dindan ar c'houarnamant. Anna Coatlogon a oa eur gristenez vat. Goulenn a reas beza eurejet en iliz. Stephan a rankas plega. Ar wech kenta oa met ivez ar wech diveza betek ma teuas ar verc'h Mona da gemer ar stur.

Houmañ, an drede eus ar vugale, a oa bet anvet Mona dre volontez ar vamm. An daou baotr avat o doa bet anioiu digristen : Hector, Achille. An hini kenta a oa bremañ ofiser war vor hag egile skolaer en eur skolaj lik e Paris, anavezet dija dre e skridou a bouez diwar benn ar skiantou.

Ne chome eta gant an tad hag ar vamm nemet Mona. Mona, rouanez an ti.

Pa welas an tad e kave ar skolaer kristen eun difennourez e Mona, e viras lakaat ar gomz war an den-se, ar muia ma c'helle.

Perak, er c'hontrol e kare Mona komz eus ar c'han kaer a veze klevet en iliz da

sul, eus al lidou-sakr ?

Evit lakaat he zad da brederia war traou an Iliz?

Ya ! kredi a rafen. Met ne lavaran ket ne ve ket eun abeg all, ar blijadur he doa o komz eus oberou ar skolaer kristen.

Met petra a zo engavet e ti an Ao. Flaouter ?

Hanternoz ar pellgent oa hag an tad a veze klevet o kanarchi evel ma n'oa ket bet klevet c'hoaz. Krena a rae an dud hag an traou tro ha dro.

Petra a zo engavet ?

Eun dra vezus, eun dra ha n'oa ket bet gwelet biskoaz. Klevit kentoc'h.

An Ao. Bourdellec a oa deut da gaout ar mestr-skolaer ha. lavaret en doa d'ezan :

— A ! traou brao a vez klevet diwar benn ho merc'h ! Bet eo o c'hoari gant ar violoñs epad an oferenn-hanternoz a-unan gant ar skolaer kristen. Brao eo ! merc'h ar mestr-skolaer lik o c'hoari en iliz gant ar skolaer kristen ! Unan bennak hag en deus da welout war gement-se, a c'houezo, me, Fanch Bourdellec, hel lavar fraez...

An tad kaes ne zigounnaras ket epad tri devez. D'ar pevare o welout Mona ouz ober he fenn, o welout Anna ha Mona teñval o dremm, o welout an daerou a ruilhe alies war dioujod e wreg, Stephan Flaouter a blegas eun tammig, met Mona a rankas prometi ne yafe biken ken da c'hoari en « tribune » a-unan gant ar mestr skol kristen.

Penaos oa engavet an.... darvoud ?

Setu.

Mona a glaske an tu da welout a-dost Gwennole Naour ha da gomz gantan. Ma teuas ar menoz-mañ en he fenn : ma 'z afen da ginnig d'an Aotrou Person c'hoari gant va violoñs da oferenn hanter-nnoz ? Ret e vezo d'in beza eilet. Mat ! den ebet ne c'hellou hen ober nemet ar skolaer kristen.

Pemp devez araok gouel Nedeleg Mona Flaouter, merc'h ar mestr-skolaer lik a c'houlenne digant plac'h ar presbital kaozeal gant an Aotrou Person.

Goude lein oa. An Aotrou Person a yeas dioustu er sal amezek, er sal-digemer. Eun nebeut amzer goude e teue er sal-dibri da c'hervel Gwennole.... ha dre ziskouez an eil d'egile :

— An dimezell Mona Flaouter..., an Ao. Gwennole Naour.

Hag an Aotrou Person a gomzas da Wennole eus kinnig Mona.

— Mat ! me a eilo ar pezh a garot, dimezell. N'ho pezo nemet digas d'in ar muzig.

En devez warlerc'h Mona a zigase ar muzig da Wennole hag a lavaras d'ezan.

— Va zigarezit, Ao. Naour, n'eo ket c'houi eo a oa oc'h ober ar « paler » war dachenn an Odet da zeiz krogad diweza ar c'henstrivadeg polotr-troad patronajou Breiz, an hini a gleved an arvestourien o krial e ano : « Gwennole » ?

— Eo, avat, dimezell, me eo e gwirionez an hini-se... Er vilin-baper edoc'h eta en devez-se ?

— Ya. Ez edomp o vont da Gemper da ober eur bale pa weljomp ar bagadoud tud o vont etrezek Erge-Vras. Neuze e talc'his ar c'harr-dre-dan a-sav evit goulenn petra a oa nevez en Erge. Hag e voe respontet d'in ez oa er vilin-baper, e traonienn an Odet, eur c'hrogad polotr-troad hag a bromete beza plijus...

— Eomp da welout traonienn an Odet ; eul lec'h kaer meurbet eo a glevan lavaret ?

Va zad a asantas en eur ziskleria :

« Ya ! eul lec'h kaer meurbet eo. Eomp di... »

— Setu penaos em eus ho kwelet, Ao. Naour, evit ar wech kenta. Va gourc'hemennou evit hoc'h ijinerez...

— Karout a rit eta an embregerez-korf, dimezell ?

— O ! kenañ ! Met abaoe oun deut da Gerdorozenn n'em eus ket a dro da embreger koulz lavaret.

Setu penaos Mona Flaouter, merc'h ar mestr skolaer lik, a reas ar.... pec'hed da C'hoari en iliz, eilet gant ar mestr-skol kristen.

Pec'hed ar c'hoant gouzout, pec'hed ar merc'hed.... Ha meur a waz.

VI. Glac'har ha Levenez

Tremenet eo goueliou Pask. Al lidou-sakr a zo bet kaeroc'h eget biskoaz. Ar c'han, evel kustum, eun dudi. Mona Flaouter, avat, n'he deus ket c'hoariet gant he violoñs.

Ar vugale a zo laouenoc'h laouena d'ar yaou o vont da ober ar valeadenn ha da zeski kana.

An holl a ra meuleudi Gwennole.

Met tostaat a ra an « testeni-studi ».

Penaos lakaat Yann da zeski awalc'h evit gellout tremen ? Gwennole a implij ar brezoneg, ar galleg, met da ober petra ? pa n'eo Yannik nemet eur penn koad.

Pa deuas an devez da gas ar vugale d'an testeni-studi, Gwennole a yeas gant Yannik. Nebeut a fizians a zo er skolaer kristen. Koulskoude piou a c'hoar ! Falloc'h egetan a zo bet kemeret.

Pa voe roet da anaout ar re a oa kemeret evit ar « skrid », ano Yann ne deuas ket er maez.

Gwennole a welas mousc'hoarz goapaüs ar skolaerien lik. Ar paour kaes skolaer kristen a santas evel eur bir yen o toulla e galon.

Pa erruas er presbital d'an abardaez.

— Ha neuze, Gwenn, petra a nevez ? ha kemeret eo da « baotr speredek » ?

An Aotrou Person, o welout dremm e skolaer :

— Arsa ! kazeg omp bet eta ! N'eus fors !

N'hon eus ket kollet hon amzer. Gounezet hon eus da vihana mignonij an dud vat. Kendalc'homp ! Kendalc'homp, Gwennig.

Da goan an devez-se an Aotrou Person a zivountas eur voutailhad gwin koz en enor d'ar skolaer kristen. Eun dra digustum m'hel lavar d'eoc'h. Ne veze ket graet friko er presbital bemdez..... en aviz espern evit ar skol. Met ezomm en doa hirio ar paour kaes skolaer kristen da veza kennerzet.

Eun nebeut deveziou goude Gwennole a gemere hent an Odet evit an ehan-labour.

Al bloavez n'oa ket bet re fall daoust ma n'oa ket bras niver ar baotred er skol gristen.

Ma n'oa ket ar vugale d'ar veleien ha d'ar skolaer kristen en deveziou skol, d'ar yaou ha d'ar sul ne oant tamm ebet kennebeut d'ar skolaerien lik. Eun dra oa dija. N'oa ket a;walc'h.

Da dremen an ehan-labour Gwennole a zo aet da genta da Odet ha goudeze da Veg-Meil, en unan eus kenkizou an Ao. Keraudren. Ar vamm hag ar c'hoar o doa ezomm eus eun tamm diskuiz ivez. Soazig he doa labouret er vilin-baper edoug ar bloaz hag ar vamm he doa bet awalc'h da ober er gêr oc'h aoza boued hag o tresa an dilhad.

Epad an teir sizun m'eo bet e Beg-Meil, Gwennole en deus lennet oberou kaera skrivagnerien Breiz.

Aotrou Person Kerdorozenn a zo bet ganto o tremen eun deveziad. Eun devez heoliek evit ar c'horf hag evit an ene.

Pemzek devez araok ma tigor ar skol e teu eul lizer da Wennole digant an Ao. Herri.

Va mignon ker,

An Aotrou Doue en deus roet e vennos d'hol labour ha d'hor poaniou. Eur galon vat, hep ma c'hallfen lavarout piou eo a zigas d'in eun nebeut bilhedou-bank.

Gant an arc'hant-se em eus feurmet eun ti evit da vamm, da c'hoar ha te, da c'hedal ma vezo savet an ti-skol, rak savet e rank beza.

Evit ar gouel-Mikael kenta an ti a zo goullou. Ho kedal a rin evit fin miz gwengolo gant hoc'h arrebeuri.

HERRI,
Person Kerdorozenn.

G. S. —Skriva a ran d'an Ao. Keraudren evit goulenn digantan digas ho traou gant unan eus e girri-labour-tredanek. Kenavo ha yec'hed mat d'eoc'h ho tri.

Eur c'helou laouen evit ar mab hag evit ar vamm. Soazig a ray eur vicher all : empeza kolierou gwenn merc'hed Kerdorozenn. Eul labour diaes awalc'h en abeg d'ar roufennou a vez enno.

Hiviziken eta e vezint tri o labourat hag o c'houzanv poan rak doareet mat eo ne 'z ay ket an traou war o zu mat bemdez....

Daouzek paotr-skol a deu en devez kenta d'ar skol gristen.

Daou vreur Yannik a gendalc'h da zont d'ar skol gristen, rak ar skolaerien lik o deus roet da anaout d'ar vamm n'o digemerfent ket. Marteze ivez ar vamm he deus komprenet n'oa ket ar mestr-skol kristen evit lakaat Yann da rei ar pezh ne c'helle ket rei...

Etouez an dek paotr all ez eus daou grennard d'ezo eur spered lemm, Loeiz Madec hag Herri Karadec.

Ha Gwennole en em laka a-zevri gant ar reolenn diou-yezek.

Ar baotred a entent, rak ar mestr-skol a gomz d'ezo en o yez. Diskouez a ra d'ezo penaos ar galleg a zo disheñvel krenn diouz ar brezoneg. Arabat eo eta trei e galleg ger evit ger ar pezh a lavarar hag a skriver e brezoneg. Dre skoueriou goudeze o laka da welet fraez ar pezh o deus klevet.

Hag ar baotred a ya war araok.

Met na pebez tamm labour evit Gwennole ! Pemp rummad a rank da ober eus e zaouzek. Ar re vihan a zesk o lizerennou, an eil rummad a ra an trede klas, an trede rummad an eil klas, ar pevare rummad, ar c'henta klas ha daou bôt o deus bet o zesteni-studi.

Ar vamm a rank bemdez da boent lein ha da boent koan gourdrouz evit lakaat Gwennole da zibri.

A-vec'h m'eo echu e bred gantan m'eman Gwennole gant ar skriva. Kas a ra pennadou-skrid da hogos an holl kannadou breizek. Eur gwenneg bennak a c'hounit evelse evit e vamm.

Soazig a ra soubenn d'ar baotred vihan re bell diouz ar gêr, hag ar soubenn a vez roet evit netra.

Hep ober kalz a drouz Soazig a sikour gounit an dud d'ar skol gristen.

Pa vez kaer an amzer, goude ar c'hlas, Mari Naour a ya da ober eun dro war unan pe unan eus an hentou a-unan gant he mab. Alies Soazig a ya ganto.

Meur a wech o deus kavet war o hent Anna ha Mona Flaouter. Eun dro genta o deus an diou vandenn pleget o fenn an eil d'eben rak an Ao. Stephan a oa war al lec'h. Eur wech all ne oa nemet an diou vaouez. Gwennole a reas eur mousc'hoarz ouz Mona hag, hep gouzout re penaos, an diou vandenn a chomas a-sav. Gwennole a ginnigas e vamm, Mari, hag e c'hoar, Soazig. D'e vamm ha d'e c'hoar e lavarar o

tiskouez an diou vaouez : Itron ha dimezell Flaouter...

Ne chomjont ket pell da varvailhat en dro-se rak aon o doa da veza gwelet gant unan pe unan eus an daou skolaer lik.

E-doug ar bloaz o deus bet tro d'en em gaout evelse war an hent ha bep wech ma veze dalc'het an Ao. Flaouter en ti-skol evit an abeg-mañ an abeg e veze kinniget gourc'hemennou ha komzet. An diou vamm a deuas da veza mignonezed. An diou blac'h yaouank ne zisplijent ket an eil d'eben ha Gwennole, a gav d'in, ne gave ket re ziaes kaout Mona war e hent hag houmañ ne ziskoueze ket kennebeut digasted oc'h ober eur varvailhadenn gant ar mestr-skol kristen.

Met an Ao. Flaouter a glevas e veze gweladennou war an hent d'an abardaez.... ha rouez e voe goudeze ar wechou ma ne yae ket gant Anna ha Mona.

Er bloaz-mañ Gwennole a fell gantan kempenn eun dra bennak evit ar Bleun-Brug da zont. Soñjet en deus lakaat ober gwiskamantou eus pep korn eus Breiz ha gwiska ganto paotred ha paotrezed ar skoliou kristen.

Lavaret en deus e venoz d'an Aotrou Kure hag hemañ en deus kavet mat. An Aotrou Person hag en deus anaoudegez e meur a lec'h e Breiz a c'houlenn digant e vignoned ober an dilhad pe paea o ober.

Deut eo Gwennole a-benn ivez da lakaat al leanezed gwenn eus skol ar baotrezed da bresta ar vugale ha da vont ganto da Gemper. Sikour a raint ar skolaer yaouank d'o dresa, da zeski d'ezo ar pezh a zo ret, ken evit ar c'han ken evit ar c'horoll.

An daouzek a zo e skol ar baotred a vezo gwisket holl.

Eun nebeut araok fin ar skol 'z eus bet diskouezet eur guchenn gwiskamantou. Ar vugale a strakas o daouarn hag a gomzas da baotred ar skol lik eus ar gwiskamantou o doa gwelet.

— Kleo 'ta. Gwiskamant ar roueed, an duged.... Na kaer e vezo. Del ! te ne vezi ket gwisket ; ne vezo nemet ar re a zo e skol an Ao. Naour hag a yelo da Gemper....

Meur a baotr a c'houlennas kuitaat ar skol lik evit mont da skol an Ao. Naour ha meur a dad hag a vamm a en em c'houlenne da besort skol kas o bugale er bloaz warlerc'h.

VII. Bleun-Brug Kemper

Lentidigez, dievezted eus o ferz, pe petra ? Ar pez a zo sur, daou baotr skol gristen Kerdorozenn, kinniget gant ar mestr-skol evit arnod an testeni-studi, a zo bet korballet.

E gwir diskibl d'ar Salver izel a galon, Gwennole Naour a laka ar bec'h war e gein e-unan.

Marteze en deus heñ fiziet re war o spered, marteze n'en deus ket heñ o lakaet da labourat awalc'h en abeg-se. Re a amzer en deus implijet moarvat gant ar re all...

Ret eo d'ezan koulskoude anzav, goude beza graet goulennou ouz e zaou baotr-skol o tont d'ar gêr eus Kemper, n'eo ket heñ eo an hini kablusa.

An daou grennard o deus faziet war ar jedi, dre zieveztet.

Elec'h lore, mestr-skol kristen Kerdorozenn a reseve eun tamm eus kroaz hor Salver.

Kouezet meudig en e zourn met nann fallgalonet, Gwennole Naour a gendalc'ho gant e labour skol ha gant e labour evit kaerderiou e vro.

Ouspenn an tri farz eus e ehan-labour a dremen e Kerdorozenn o teski e baotred hag e baotrezed, o kempenn pe o lakaat kempenn an dilhad evit Bleun-Brug Kemper.

Deut devez ar Bleun-Brug, Gwennole, a n'en deus ket kousket koulz lavarout, a zo abred war sao. Dioustu goude an oferenn ez a da welout ha prest eo ar c'harr-dre-dan, hag engavet eo ar baotred, ha digaset eo an holl draou er c'harr...

E Kemper, e tiskarg e vandenn er Retred.

Al leanezed a wisk ar baotrezed ha Gwennole en em soursi eus e zaouzek krennard.

Pa 'z eo gwisket an holl, int bodet ha goude eur banne kafe tomm kaset dre gêr.

Ma 'z eus bet tud lorc'hus war an douar-mañ eo paotred ha paotrezed Kerdorozenn en devez-se. Arsa ! n'eo ket souez ! ne glevont dre ma 'z eont dre Vali an Odet da skolaj Sant Erwan, nemet komzou evel ar re-mañ :

— O ! na kaera bugaligou ! na kaera paotred ! na koanta merc'hedigou !

— Sell 'ta ar Vigoudenn ! na brao eo h !

— O ! an dilhad brao ! nann ! biskoaz, e gwirionez, n'eus bet gwelet kement all....

P'emañ ar Vretoned hag ar Vretonezed bihan o vont da drei a-gleiz war-du skolaj sant Erwan, Gwennole a spurmant karr-dre-dan Mona, etouez ar gweturioù a zo chomet a-sav war ar pont evit lezel ar vandenn da dremen.

Mona he deus goulennet digant he zad mont da ober eur bale da Gemper en dervez-se.

« Ezomm he doa eus meur a dra », a lavare hi.

Evel kustum an tad a blegas.....

Mona a c'houie mat ez edo en devez-se gouel ar Bleun-Brug e Kemper. Perak eo hi en em lakaet da zeski brezoneg ? Eur froudenn, a gav d'ezi....

Gwennole ne welas ket ar mousc'hoarz he deus graet Mona outan.

Klevout a ra da vihanan ar c'homzou-mañ lavaret kreñv a-ratoz gant Mona :

— Sellit 'ta ! merc'hedigou Kerdorozenn. An Ao. Naour a zo ganto. Na kaera merc'hedigou !

Stephan Flaouter o klevout emañ mestr-skol kristen Kerdorozenn o sellout war ar vugale gwisket kaer n'o c'hav mui ken brao, hag eur soñj a deuas en e benn.....

« Daoust ha n'eo ket deut Mona da Gemper da welout an traou-se ha da sellout ?.... »

Meur a dra a seblant heñ kompren bremañ...

« Sellout piz a rankin hiviziken ouz doareou-ober Mona ! »

Met kaer en deus bet kemerout mennadou nerzus, goude koan eo..... paket adarre gant Mona.

Stephan Flaouter a zo bet o preja e ti eur mignon d'ezan, kelenner e skolaj-lik, Kemper. Goude ar pred, an daou skolaer a chome da varvailhat. Mona a c'houlenne aotre digant he zad mont da ober eur bale, da brena traou e kêr. Ar mab eus an ti, Ulises, a ginnig mont ganti. Ar paour kaes den ne wel ket an neuz-fall a ra neuze Mona. Met houmañ ne vez ket divarc'het buhan hag a lavar :

— Mat ! deut, Ao. Ulises, ne vezimp ket re bell.... ma 'r gallimp....

Ar verc'h gwidreüs he deus lakaet en he fenn mont da skolaj sant Erwan da welout bugale Kerdorozenn er c'hoariva, ha peogwir en deus Ulises kement-se a c'hoant da zont ganti, e vo kaset da glevout.... brezoneg, da welet.... traou breizek

Ulises, end-eeun, en deus ginet pa welas da belec'h oa digaset, heñ hag a gave d'ezan kaout eun dro gaer da ziskleria e garantez da Vona, dre vale a-hed ar sterig Odet...

Mona a zo laouen gant he zaol....

Evit rei neuz ar wirionez d'he c'homzou he deus prenet eun draig bennak « er bazar ».

Goude eur brezegennig graet gant Rener-Meur ar Bleun-Brug ha straket kenañ an daouarn d'ezan, e c'hoarier *Trubuilhou ar seiz Paotr yaouank*, en eun doare fentus meurbet. Kanaouenn a zo etre pep arvestr ha pep pezh-c'hoari.

Paotred ha paotrezed Kerdorozenn eo a ro ar c'han.

Mona a deu an dour en he daoulagad o klevout : *Kousk, Breiz-Izel ; O Breiz, va Bro ; Sav, Breiz-Izel*, hag all....

Ne c'houie ket ez oa traou ken kaer e Breiz... ha meur a hini a zo c'hoaz heñvel outi.

Goude ar pezh-c'hoari *War varc'h d'ar mor*, e teu war ar c'hoariva,.... Gwennole e-unan.

Emaen o vont, emezan, da ziskouez, d'an arvestourien kaerderiou pep korn Breiz.

« Va zimezelled vihan a vezo eun tammig lent marteze, o digarezit, ar wech kenta eo d'ezo da c'hoari ha da gana war ar c'hoariva.... »

— Brao, brao ! mat eo...

Gwennole a ya e-kichen ar ouel, e kuz e koztez ar c'hoariva. Met amzer en deus bet da welout Mona... ha Mona he deus bet amzer da verzout eo skuiz Gwennole.

Etre ma klever ar biniou hag ar vombard, ar merc'hedigou unan-hag-unan a deu war ar c'hoariva. Pep hini a gan he foz hag a ro da anaout ar wiskamant a zoug.

Evelse ar Vigoudenn, ar Fouenadez, ar Jikolodenn, ar Baganez, ar Sparl, ar « Penn Sardien », hag all, hag all..., a deu war al leurenn.

Bep wech e vez straket an daouarn hag e vez hopet : « Brao, brao !... »

Eun ugent bennak a zo war al leurenn-c'hoari.

Neuze, an eil krog e biz bihan eben, ar merc'hedigou a goroll, a goroll holl korollou Breiz.

An arvestourien p'eo echu ne c'houzont ket penaos diskouez o flijadur. Endiwez eur vouez a lavar : « Bevet merc'hedigou Kerdorozenn ! »

Hag ar sal a-bez a gri : « Bevet merc'hedigou Kerdorozenn ! »

Eus e gorn, Gwennole, goude beza sonet e gloc'h bihan, a gri : « Bremañ, tro ar baotred ».

Hag ar baotred, unan-hag-unan, a deu d'o zro war al leurenn. Kana, koroll a reont evel ar merc'hedigou....

Dudi warlerc'h dudi.... ha strakadeg daouarn ken a son....

— Bremañ, paotred, kit da glask bep a gavalierez ha diskouezit d'an dud penaos e c'houezit « kas an dañs ».

Mont a reont dre eun tu eus al leurenn, ha dont a reont dre an tu all krog e biz bihan eur plac'hig, ha da goroll, ha da gana....

Ar sal ne finv ket... Petra 'zo nevez ? Perak ne vez ket straket an daouarn p'eo echu ar c'horoll ?

Allas ! emaint holl o c'hoarzin, o ouela, o c'hoarzin hag o ouela en hevelep amzer....

Rener-Meur ar Bleunv-Brug a sav neuze :

« Mignoned, emezan, biskoaz n'hon eus gwelet kement all... Gwelet hon eus dre ar baotred hag ar merc'hedigou-man Breiz a-bez dirazomp. Chom a reomp dilavar dirak an daolenn-man. Hor c'halon a drid kement ennomp ma ve lavaret n'eo ket gouest da zerc'hel eur seurt levenez ha ma rankomp moustra warnan... »

Er sal, ar bizier a sko war ar planchod da ziskouez e vez kavet mat komzou ar Rener-Meur.

« Rei a reomp eta hor gwella gourc'hemennou d'ar baotred ha d'ar baotreded bihan-man. »

Strakadeg daouarn.

« Hor gourc'hemennou a ya, dreist holl, d'an hini en deus kempennet an holl draou kaer-se. Hennez ne c'hall beza nemet eur Breizad speredek ha kalonek. Goulenn a reomp ma teuy war al leurenn-c'hoari aozer kan ha korollou breizek emaoamp o paouez klevout ha gwelout.... Gwennole Naour, mestr-kelenner kristen e parrez Kerdorozenn. »

Eur pennad goude, poulzet gant e vignoned, Gwennole en em ziskouez eun tammig e korn al leurenn...., drouk-livet eo evel eun den klañv.

Ar sal en he sav ne ehan ket da hopal ha da strakal an daouarn... « Bevet an Ao.Naour ! Bevet Gwennole !.... »

Mona a zo chomet da sellout ouz an traou war dro skolaj sant Erwan, daoust ma lavar d'ezi hep ehan Ulises, ar skolaer lik....

« Eomp kuit buan, gant aon na vemp anavezet.... »

Mona a rank gwelout Gwennole evit diskouez d'ezan he levenez ha kinnig he gourc'hemennou...

E welout a c'hall o tont eus ar c'hoariva hag o vont gant he vandenn d'ar Retred...

En eur dremen dirazi Gwennole ne finv ket met na livet fall eo ! Ne wel ket

eta mousc'hoarz Mona ?....

Ha Mona he deus komprenet prim...

Ulises eo an hini a ra poan-galon da Wennole ?.....

Ulises, mignon Mona ? Ulises karantig, pried Mona ? C'hoant he deus da zirioll da c'hoarzin d'ar menoz fol-se..., met ne c'hoarz ket.... Gwennole a zo skuiz, Gwennole en deus poan-galon en abeg d'ezi... Nag hi a zo bet diboell ! n'he doa ket soñjet ! Perak n'oa ket chomet Ulises er gêr !!

Met Ulises a oa laouen. Ne anaveze ket Breiz, ar gwir Vreiz.... Tremenet en deus eun nebeut euriou e kompagnunez Mona, Ulises a zo evurus...., ha Mona bremañ a zo trist, trist da c'hoantout leñva.....

VIII. Gwarizi ha taol-droukrans

Mari Naour he deus dalc'het he zi e kêriadenn an Odet. Di eo ez eas Gwennole da gemer eun diskuiz gounezet mat hag eun diskuiz en doa ezomm bras anezan, goude gouel Bleunv- Brug Kemper.

Tri dervez goude ar gouel, Aotrou Person Kerdorozenn a deue en ti etre lein ha mern.

— Gwennole hag heñ a zo er gêr, Mari ?

— Ya, Aotrou Person, en nec'h emañ, en e gambr. Kousket e tlie beza c'hoaz ken skuizet ha ma 'z eo bet gant ar gouel-se !

— Ya, eur gouel kaer meurbet... Met skuizus evit Gwennole... Deut oun da rei eur c'helou mat d'ezan.

D'an ampoent er solier e klever trouz e kambr Gwennole ha Gwennole e-unan a ziskenn.

— Demat ! Aotrou Person. Eur c'helou ho peus evidon ! Va ael mat en deus va dihunet evit klevout ar c'homzou-se hag evit gouzout ar c'helou-mat.

— An Ao. Pondusval, Gwennig, o tont da ober eun dro er vro evit gouzout doareou e gastell hag e zouarou en deus klevet komz eus hon ti-skol.

Deut eo d'am c'haout ha diskleriet en deus d'in :

« — Perak n'ho peus ket roet d'in da anaout oa ken paour ho ti-skol ? Perak, pa c'houezit mat ne vezan ket alies er vro, beza chomet hep skriva d'in ?

« — Aotrou Pondusval, em eus respontet d'ezan, gouzout mat a ran hoc'h eus kemeret ar garg eus meur a skol dija e eskopti Naoned. Biken eta n'em ije kredet goulenn diganeoc'h.

« — Da skoliou va farrez e eskopti Kemper ha Leon e fell ganin beza da genta. Rak-se setu emañ peadra da lakaat sevel eun ti-annez evit ar skolaerien ha daou glas all... N'am zrugarekait ket. Plijadur em eus bet o selaou an dud o tiskleria taoliou-kaer ho mestr-skol. C'hoant bras em eus e chomfe an trec'h ganeoc'h ho taou. Goulennit eta diganin ar pezh a garot.

«—Aotrou Pondusval, ma teu an trec'h, an trec'h leun d'imp, e vezo dre ho sikour dreist-holl. Doue ho pennigo, Aotrou Pondusval. »

— An Ao. Pondusval, eme Gwennole, a zo eun den madoberus. An Aotrou Doue en taol-mañ a zo a-grenn ganimp. Ma kendalc'h d'hon harpa en doare-se n'hor bezo mirit ebet o kas hol labour da benn.

— Eur c'helou all a zo c'hoaz, Gwennig. An Ao. a Gerguaoc hag a zo bet kenkoulz evidomp beteghen a ro d'imp ar park a-bez a zo harp ouz an ti-skol ha pemp mil lur ouspenn.

— Ma 'z eus tud fall war an douar tud vat a zo ivez, eme Vari.

— Ya, Mari ; setu perak kendalc'homp gant hol labour ha Doue da veniga hor madoberourien...

Hag an Aotrou Person a drink evit yec'hed an holl.... rak Soazig he deus degaset jistr bountet war an daol etre ma kaozee ar re all.

— Gwennole, eur c'helou mat all em eus da rei d'it da anaout.... Teir familh o deus prometet digas o bugale d'ar skol gristen..., teir familh muioc'h eo.

— O ! fizians em eus e vezo gwelet familhou all oc'h ober o dever.

— Ne gavin ket souezus. Kement a ano a zo diwarbenn mestr-skol kristen Kerdorozenn abaoue Bleun-Brug Kemper !

— Aotrou Person, ar pezh a ra d'in fiziout e teuy kalz paotred da skol Sant-

Gwennole n'eo ket an trouz a vez graet diwar-benn ar Bleun-Brug diweza ha diwar va fenn-me, met ar gredenn start e ro an Aotrou Doue e vennoz d'al labour diazezet war ar groaz.

— Gwir eo, Gwennole ; araok sevel war menez an Olived e ranker pignat war hini ar C'halvar. An Aotrou Doue a zale awechou da rei an trec'h d'e vignoned evit o lakat da labourat gant eur brasoc'h nerz hag eur garantez birvidikoc'h. Diskouez a ra emañ ganimp dre zegas tud kalonek mat war hor sikour.

Kendalc'homp eta, rak an ero n'eo ket kaset da benn c'hoaz ha n'hen bezo nemet pa vezo deut holl vugale Kerdorozenn da skol o c'hredenn, ar skol gristen.

En devez ma tigure ar skol, e c'halled gwelout eun ti-skol kristen kaer meurbet, pe kentoc'h eur c'hlas kaer, rak an ti n'oa ket echu c'hoaz.

Ar c'hlas a c'halle reseo daou-ugent paotr-skol. En devez-se Gwennole a niveras... hanter-kant paotr.

An daerou a deuas e daoulagad ar Person, deut, araok mern, da ober eur sell war e vugale.

Familhou Kerdorozenn, hini goude hini, a deue da gompren o dever.

Bugale kristen a rank kaout eur skol gristen. Meur a hini a gave d'ezo e vije deut o ferson ha mestr-skol Sant-Gwennole da fallgaloni, e vije serret dor ar c'harr-di a servije egiz skol gristen.

An traou n'int ket aet evel ma sonjent ha ma fizient.

Ar skol paour-ran, elec'h serri, a vraoae hag a vrasae. Unan bennak, er barrez, a zo bet klevet o tiskleria.

— Abaoue m'eo deut ar skolaer-se en hon touez n'eus peoc'h ebet ken. Araok e c'hellemp kas hor bugale d'ar skol lik hep ma ve lavaret an distera tra d'imp. Prest moarvat e vezo nac'het hor sakramanchou ouzimp !...

An darn-vuia eus ar barrezianiz evelato a droe muioc'h-mui ouz ar mestr-skol kristen.

Mouez ar goustians a veze evesaet muioc'h-mui outi.

Profou kaer an Aotroued a Pondusval hag a Gerguaoc a lakaas ivez meur a hini da eeüna o menozioù.

Dallet evel ma 'z oant gant kazetennou fall n'oant ket evit kredi e c'helle an dudjentil sikour gant o arc'hant sevel tiez-skol evit ar bobl.

Na ped gwech n'o doa ket lennet pe klevet ne glask an dudjentil nemet « suna gwad ar bobl », nemet kemeret plijadur diwar goust an dud izel.

Ma roe aotroued-jentil ar barrez o arc'hant evit lakat sevel eur skol gristen dereat, n'oa ket evit o bugale d'ezo oa, pegwir ar re-mañ a veze kaset ganto d'ar skolajou bras.

Eun dra all hag a sikouras ivez, marteze muioc'h eget an abegou all, familhou Kerdorozenn da senti ouz lezenn an Iliz eo m'en doa an Aotrou a Pondusval inkantet dre ar barrez e paefe evit ar bloaz a deue o levriou da holl baotred an ti-skol kristen.

An Ao. a Gerguaoc hen en em gargfe da lakât rei d'ezo bemdez, en ti-skol, da boent mern, eur banne soubenn domm.

Awalc'h evit digas da soñj da veur a gristen eo eun dra vat en em ziskouez kristen bepred hag e pep lec'h.

Setu penaos ar c'hlas nevez a oa re vihan evit degemer an hanter-kant paotr a deue da skol gristen Sant-Gwennole devez kenta ar bloaz-skol.

Levez a zo eta e kalon ar Person hag ar Mestr-skol kristen.

Kalon ar mestr-skol lik avat a zo leun a c'houervoni. En taol-mañ e kemer aon, aon na ve goulouderet e skol d'ezan. Petra lavarou neuze e vistri eus Kemper ? Petra lavarou e geneied, meur a hini anezo marteze karget a warizi en e geñver ?

Kousto pe gousto, ret eo enebi.

Met, hervez e soñj, netra vat ne c'hell beza graet, etre ma chomo an Ao. Bourdellec e Kerdorozenn. Heñ eo, hep mar ebet, a zo o lakât an dud da drei kein d'ar skol lik. Rak an dud amañ a zo ouz koztezenn ar c'houarnamant lik. Ra vezo kaset kuit hag a-unan gantan ra vezo kaset kuit eus ar gomun ar menoziou dispac'hus. ar menoziou ruz a freuz hag a gasoni. Mat eo beza eun den digabestr, eun den hep relijion. Met ober brezel da vreudeur, prezeg ar gasoni hag al lazerez, nann ! nann !...

An Ao. Enseller a resevas eta eul lizer digant mestr-skol lik Kerdorozenn evit goulenn ma ve cheñchet an Ao. Bourdellec.

Goude eun nebeut devezioù ar respont deut digant an Enseller a roe da anaout n'oa ket heñ evit cheñch an Ao. Bourdellec dioustu.

An Ao. Enseller n'edo ket a-unan gant ar gomunisted, emezan met pa n'en doa plas all ebet da ginnig d'an Ao. Bourdellec, ne c'helle ket e ziblas, hep lakât freuz... Ret eo eta gouzañv c'hoaz...

Met Stephan Flaouter ne c'houzañvas ket pell.

Edoug eur miz skol ar skol lik he doa kollet pemp paotr all aet da skol ar veleien.

Eul lizer all a voe kaset d'an Ao. Enseller. Er gêr amezek eur skolaer a voe kouezet klañv. An Ao. Bourdellec a resevas kemenn a-berz Kemper da guitât Kerdorozenn.

An taol a oa kalet evit mignoned an Ao. Bourdellec. Hemañ, evit lavarout mat, ne gavas ket re ziaes. Gwelloc'h e kave, end-eeun, mont e kêr. Skuiz oa ouspenn gant tud Kerdorozenn. Ar gouerien, diouz e soñj, a oa re « boud » d'ar menoziou dispac'hus. Kaer a zo, ar c'houer a zalc'h start d'ar peoc'h etre an dud, marteze eun tammig dre ma c'hello evelse derc'hel start d'e yalc'h bet d'ezan kement a boan evit he c'harga.

Ar gomunisted eus ar vro a ziskouezas brasoc'h imor. Koulskoude, goude eun abardaeziad trouz, en devez ma 'z eas an Ao. Bourdellec kuit eus Kerdorozenn, ar sperejou a seblantas gounezet d'ar peoc'h hag ar c'halonou d'ar gengarantez.

Ar sioulder araok an taol-amzer, n'oa ken. Ar brud-a oa aet betek Paris eus ar pezh a dremene e Kerdorozenn.

An trec'h d'ar skol gristen war ar skol lik ! Ar veleien hag o zud trec'h da labourerien an Dispac'h !

Kement-se ne c'helle ket beza !

Kaset e voe eur prezeger eus Paris da zihuna Kerdorozenniz. Eur sulvez e voent pedet da vont d'e selaou e sal an ti-kêr.

Epad eun eur e voe diskouezet d'ezo penaos oa eur vez evite en em lezel da

veza trec'het gant o eneberien, penaos oa eun dever bras evito labourat evit evurusted ar bobl, evit baradoz an douar an dud izel.

Moarvat oa deut ar prezeger a-benn ouz e daol rak an dud o tont er maez eus ar sal a grie a-bouez-penn an *Internationale*.

Pa vez c'houezet an tan ne ouezer ket atao penaos e laza...

Gwir eo ! Ar prezeger komunist, ma en deus komzet enep an dudjentil, enep ar vourc'hizien hag ar veleien, n'en deus ket goulennet o laza.

Met ar menozioù a zoug d'an oberou...

Pa vez hadet kasoni e tiwan oberou fallakr. Hag ar prezeger en deus hadet kasoni e kalon e selaouerien. N'en deus ket soñjet e c'hell unan pe unan eus ar re a selle outan gant daoulagad pik hag entanet, lakât, p'o dezo tro, ar menozioù da dalvezout dre oberou.

N'en deus ket soñjet ez eus etouez e selaouerien eun nebeut ailhoned eus ar gêr amezek a ne gomprenint ket mat e gomzou, a ne garont nemet ar freuz hag ar reuz.

Aet eo ar prezeger kumunist en dro da Baris.

E Kerdorozenn avat e kendalc'h ar c'han hag ar c'hri.

Sec'hed a zo paket.

Evet e vez, evet re...

O vont d'ar gêr, d'an abardaez, daou baotr yaouank eus ar gêr-vras amezek a dremen dirak ar skol gristen.

D'an ampoent ar mestr-skol kristen a deu eus ar c'hourt war an hent, a-unan gant e eil-skolaer eus Pont-Aven.

Degouez gwall-evurus !

Unan eus ar baotred yaouank en deus anavezet an daou skolaer.

« *Tiens ! voilà les deux calotins !* »

An evaj milliget a laka an den da goll e benn...

a sil fallagriez e kalon an dud wella...

Daou denn sec'h, a darz war an hent...

Mestr-skol kristen Kerdorozenn, Gwennole Naour, a gouez... hag a chom difinv war an hent bras...

IX. Daerou eur Person... hag eur plac'h yaouank

Na trist eo bet an oferenn-bred e parrez Kerdorozenn d'ar zul kenta a viz kerzu, ar sul goude m'eo bet kavet Gwennole Naour beuzet en e wad, war an hent bras !

Ar beñveg-muzig a zo chomet sioul evel p'en defe c'hoant da ziskouez emañ e kañv.

Ar baotred hag ar paotrezed ne ganont ket koulz lavarout. Fazia a reont en o c'han. Unan bennak a vank en iliz ; spered ar vugale n'emañ ket war kan an oferenn.

Gwennole Naour chomet difinv war an hent bras e kichen an eil-skolaer kristen, Jozeb Keginer, en deus paket eun tenn en unan eus e skevent hag unan all en e benn.

Al louzaouer en doa lavaret e gas raktal da Gemper. Oberataet e ranke beza dioustu hag en devez-se end-eeun, gorrek, gorrek, karr-dre-dan an Ao. A Gerguaoc a zouge korf Gwennole etrezek Kemper.

E klanv-di an doktor Meriven eo lakaet Gwennole. War an daol-oberaterez... ne finv ket atao. Goulskoude tenna a ra e alan. N'eo ket maro c'hoaz...

Ar voc'h kleiz a zo eun toull enni. An tenn a zo aet drezi ha deut er maez e tro kein ar gouzoug. Ar javed n'eo ket bet stoket. War an tu-se n'eo ket gwall risklus ar gloaz.

Hini ar skevent a zo gwasoc'h ! Ar boled a zo chomet ennan. N'en deus ket treuzet penn-da-benn. Ar beg anezan a deu ermaez eus ar skevent hag ar penn-a-drenv a chom en diabarz. Setu petra ziskouez ar « radio ».

Ret mat eo oberata.

Digoret eo kostez Gwennole..., tennet ar boled ha gwriet ar c'hroc'hen war gorre ar gouli. Ar paotr yaouank kaes a denn aesoc'h e alan bremañ met liou ar maro a chom war e zremm.

An Ao. Person n'en deus ket e guitaet, prest da rei d'ezan e zakramantou diweza, m'ar bez ret.

Paour kaes Ao. Herri ! Truezus eo e welout.

Eun eur goude an oberatadur, Gwennole a zigor e zaoulagad, e zourn a gas d'e benn ha d'e gostez ha klevet e vez o lavarout : « Poan am eus ; va mamm, perak em eus poan ?... »

Met kaer o deus ar vamm hag ar person komz outan, pokat d' ezan dre skuilh daerou, Gwennig ne ziskouez ket o anaout.

Al louzaouer a lavar neuze e lezel da ziskuiza.

D'ar sadorn warlerc'h Gwennig a yae eun tammig gwelloc'h, met riskl ar maro n'oa ket teuzet c'hoaz...

D'ar gwener veure, er sakreteri, goude e oferenn an Ao. Person a wel o tont d'e gaout, Mona Flaouter...

— Aotrou Person, emezi, deut oun da c'houlenn kelou. Penaos emañ Gwennole Naour ?...

An Ao. Person a wel mat eo ruz daoulagad an dimezell...

— N'emañ ket re vat, Mona, eun tenn en e c'henou hag unan all en unan eus e skevent. Eun tammig oa gwellaet diouz an noz dec'h, met e riskl bras emañ da goll e vuhez...

— Aotrou Person, ne c'hallfec'h ket lavarout dek oferenn evit Gwennole Naour ?....

— Da zigeri warc'hoaz, Mona, ha bennoz Doue evit Gwennole. Karout a rit eta Gwennole Naour ?

Mona n'eo mui evit herzel... Karout ? karout ? emezi hag e tiroll da ouela, met da ouela kement ma rank an Ao. Person he c'hennerzi.

— O ! na pebez devez ha na pebez nozvez, Aotrou Person... Kaout a rae d'in oa maro... O ! bennoz da Zoue ! Pare a a ray ne ket 'ta, Aotrou Person ? !

— Fizians em eus, Mona, gant sikour ho pedennou...

Allas ! ar pare a zo pell. Pemzek devez goude m'oa oberataet, d'an ampoent ma kave da bep hini n'oa riskl ebet ken e teuas goloenn ar skevent da entana (pleurésie). Dinerzet evel ma oa Gwennole, en taol-mañ ne vije ket evit harpa...

Gwennole a oa neuze e Beg-Meil e kenkiz « Ar roue Grallon » unan eus kenkizou an Ao. Keraudren.

Dioustu pa glevas ar c'helou an Ao. Herri a gemeras hent Beg-Meil...

— En taol-mañ, Ao. Person, eo graet ganin, ne vezin ket evit harpa...

— D'az oad kaout menoziou evel hennez ? Parea a ri ha dont a ri adarre da ober skol... leun-chouk eo an daou glas.

— Piou a ra skol bremañ a-unan gant Jozeb Keginer ?

— Me va-unan hag an Ao. Kure, bep eil...

Hag an Ao. Person a gont penaos en deus plijadur ouz ober skol, o lakaat ar baotred da c'hoarzin pa welont o Aotrou Person gwenn-kann e zae-veleg gant kleiz kement e fich an torch taolenn-zu. Met ne lavar ket eo karet ha doujet. Diskleria a ra avat e laka ar baotred da veza fur ha troet d'al labour dre gomz d'ezo eus poaniou o mestr-skol...

Eur miz goude ar gwall-eur, Gwennole Naour a zo kollet. Al louzaouer en deus lakaet skinarouezia da Aotrou Person Kerdorozenn :

« Deuit, falloc'h eo Gwennole. »

Ar sul oa anezan.

Pa savas er gador-brezeg, an Aotrou Person a lavaras gant eur vouez c'holoet :

« Va breudeur ker, erbedi a ran gant holl nerz va c'halon d'ho pedennou ha d'ho sakrifisou, hor mestr-skol ken karet, Gwennole Naour. Emaoun o paouez degemerout eur skinarouezadenn (télégramme) da lavarout d'in mont d'e gaout, eo falloc'h. »

Va breudeur ker, Gwennole Naour en deus klasket ober vad d'ho pugale. Poan en deus bet. Ha deut oc'h da gompren ne glaske na ne glaskomp nemet ho lakaat da anaout Doue, d'e garout ha d'e servija evit gounit eun devez ar baradoz.

Diskouezit eta ho trugarez dre bedi evit ho mestr-skol kristen, bremañ aon em eus, war e dremenvan.

A greiz kalon lavaromp evitan eur Bater hag eun Ave Maria, evit ma plijo gant Doue e barea hag e zigas d'imp aman e yec'hed. »

An Aotrou Person en deus lavaret ar *Bater*, met a-vec'h m'eo kroget gant an *Ave Maria* ma teu e vouez da vankout hag an daerou a ruilh war divoc'h Aotrou Person Kerdorozenn. N'eus ket en unan en iliz ha ne ouelfe ket...

Unan a zo avat hag a leñv muioc'h eget ar re all epad an oferenn penn-da-benn hag a chom da bedi en iliz goude m'eo echu an ofis, kaer he deus he mamm klask he c'has ermaez. Ha Mona Flaouter, an hini eo.

— Bennoz Doue d'eoc'h, Aotrou Person, da veza deut d'am gwelout araok ma varvin. Geo ! gouzout a ran emañ o vont da vervel.... Prest oun, bet em eus va zakramantou... Araok mont kuit e fell ganin diskulia d'eoc'h eur sekred. Pardonit din, Aotrou Person, karout a ran eur plac'h yaouank... ha biken n'em ije gellet dimezi ganti, rak n'eo ket gwisket e Breizadez hag ouspenn... An dimezell-se eo... Mona Flaouter, merc'h mestr-skolaer lik Kerdorozenn. Eur mestr-skol kristen, karout merc'h eur mestr-skol lik aheurtet ! ! Aotrou Person, bremañ n'eus mui netra kuzet em c'halon evidoc'h. Laouen oun bremañ o vervel. Bennoz Doue evit beza va zibabet da skolaer e Kerdorozenn... O ! karout a ran bugale Kerdorozenn. Hel lavarit d'ezo...

— Gwennig, en abeg d'ar garantez-se ne c'hallez ket mont kuit diouzimp. Al louzaouer en deus lavaret d'in e parei kalz buanoc'h m'emañ da volontez troet eus ar pare... Gwennig, pare a rankez evit... bugale Kerdorozenn.

Gwennole en deus bet eur mousc'hoarz skuiz, difazius...

— Aotrou louzaouer, eme an Aotrou Person araok mont kuit, lavaret ho peus d'in e ve mat rei d'ar c'hlañvour eur sebezenn c'houek ?

— Ya, kement-se a sikourfe anezan da drec'hi e venoziou du...

— Doktor, kavet em eus hoc'h afer... Mari Naour, roit da anaout da Wennole e teuy Aotrou Person Kerdorozenn davetan arc'hoaz hag en dezo eur souezenn laouen-laouen...

Antronoz vintin goude dijuni, an Aotrou Person a yae d'ar skol gristen...

— Va bugale, emezan, ho mestr-skol karantezus a zo prest da vervel. Arabat e varfe. Ma varv, dre ho faot c'houi e vezo, rak neuze n'ho pezo ket pedet mat awalc'h. Alo ! va bugale vihan, en ho sav, hag ho taouarn stok-ha-stok, ho taoulagad serret lavarit ganin-me eun dizenez eus ar chapeled...

Piou ne ve ket teneraet e galon ouz gwelout eur seurt taolenn !

Beteg ar re vihana, holl e lavarjont an dizenez hep finval..., lod zoken a ruilhe daerou war o dioujod...

— Mat eo ! va bugale ker, an Aotrou Doue hag ar Werc'hez Vari a rank hor selaou. Bremañ piou a yelo dirak ar sakramant benniget en iliz evit lavarout ar chapeled epad ma vezin e-kichen Gwennole, rak emañ o vont adarre d'e welout...

— Me ! me !..., hag an holl baotred a sav o biz...

— Mat-tre ! mat-tre ! va bugale, neuze ez eot daou ha daou dirak ar Sakramant meulet ra vezo betek an abardaez, da boent ma echu ar skol. Pedit mat hag an Ao. Gwennole a deuy adarre da ober skol d'eoc'h ha da zeski d'eoc'h kana en iliz...

Araok mont kuit eus Kerdorozenn, wardro nav eur, an Ao. Person a voe gwelet o chom a-sav gant e garr-dre-dan e-kichen an ti diweza eus ar vourc'h war hent Kemper. Neuze e teuas eus an ti eur plac'h yaouank koant meurbet gant he c'hoef broudet, seizennou liou roz a-zistribilh outan, he c'holier gwenn-kann hag a leze kroc'hen gwenn ar gouzoug dizolo, he c'horfenn hag he broz voulouz, he zavanjer seiz broudet.

Ar goantenn a yeas er c'harr-dre-dan ha kerkent heman a loc'he.

E Beg-Meil, an traou ne daent ket gwelloc'h. An noz a oa bet fall hag an holl, Gwennole ivez, o doa mall da welout an Ao. Person ouz en em gaout.

Mari Naour a oa sebezet o welout ar plac'h yaouank koant. Ne anaveze ket ar plac'hig vrap-se... goulskoude e kave d'ezi beza gwelet an dremm-se, hanter guzet bremañ gant ar bleo eun tammig disparbuilh, en tu bennak.

— Kousket eo Gwennig, Mari ?

— N'eo ket, Aotrou Person..., ouz ho kedal emañ.

An Ao. Person a ya er gambr. Daoulagad Gwennole a sell, a sell outan. Anat eo e soñj er sebezenn.

— Klask a rez petra em eus da ziskouez d'it pe da lavarout hag a ray plijadur d'it, Gwennig..., gortoz eur pennadig...

Goude beza komzet eur pennad amzer gant e vestr-skol, goude beza gwelet e pe stad ez edo, an Ao. Herri a yeas da zigeri dor ar gambr... e vuzellou a finve... Kaout a ra d'in edo o paterat.

Ar plac'h yaouank a deu neuze er gambr. Ken livet fall eo dija hag ar c'hlañvour. Tostaat a ra gouestad ouz ar gwele... Den ne lavar grik. Ar c'hlañvour a zisparbouilh e zaoulagad.

Ar plac'h yaouank a gred en-diwez lavarout gant eur vouez enkrezet... Met c'houek, c'houek.

— Gwennig !...

— Mona !

Mona a zo kouezet war bennou he daoulin e-kichen ar c'hlañvour sebezet, laouen...

Mari Naour, ar vamm glac'haret, war treuzou an nor ne ehan ket da lavarout : « Hi, hi a-mañ ! »

An Ao. Person a reas sin da Vari hag o daou ez ejont er gambr e-kichen. Neuze e tisklerias d'ezi penaos heñ eo en doa graet an taol.

Gouzout a rae e kare Mona Gwennole hag oa hi karet gant Gwennole.

Lakaet en doa Mona da ampresta gwiskamant he mignonez, Marc'harid Toullec. Eun digarez mat he doa kavet Mona evit kuzat he baleadenn... ha setu penaos eo bet graet an taol...

Fizians em eus, Mari, e ray ar weladenn-mañ vad da Wennig.

— Marteze, Ao. Person, met goude ? Gouzout mat a rit ne lezo biken an Ao. Flaouter e verc'h da zimezi gant eur skolaer... kristen, hag ouspenn gouzout a rit ne fello biken gant Gwennig dimezi gant eur plac'h yaouank a ne zougo ket ar wiskamant vreizek ! Hogen anat eo ne c'hello ket Mona kenderc'hel da zougen ar wiskamant a zo warni bremañ...

— Mari, na c'houlennomp ket re dioustu... An traou, sur oun, a droio mat... gant an amzer. Evit bremañ eo ret savetei Gwennole.

Pa zistrojont e kambr Gwennig edo ar c'hlañvour e zourn dehou war e galon hag e zourn kleiz dindan penn Mona, war al linsel-wele... An daoulagad o oa serret. Gwennole a oa en em roet da gousket.

Tri dervez a oa n'en doa ket serret e zaoulagad.

Mona a ouele goustadik hag a boke da zourn ar c'hlañvour.

Eur miz goude, Gwennole a yae, harpet war brec'h e vamm hag e c'hoar Soazig, da ober e valeadenn genta dindan heol klouar eun abardaevez goañv...

Ar burzud a oa graet dre nerz pedennou ha sakrifisou ar vugale, dre nerz eur wiskamant vreizek.

X. Biken...

Da veurz ar sizun santel diouz an abardaez, Aotrou Kure Kerdorozenn a engave en iliz parrez wardro pemp eur. Eno e kave daouzek paotr yaouank, o dilhad da sul ganto hag eur penn-baz en o dourn.

Eur bedenn a zo graet dirak sakramant an Aoter, goulennet e vez digant Doue, ar Werc'hez, Sent ha Sentezed Breiz ar c'hras da ober eur... pirc'hirinded mat ha laouen...

An Ao. Person en deus lakaet sini ar c'hleier hag a ro e vennoz d'ezo pa deuont er maez eus an iliz ha pa dremenont dirak dor-porz ar presbital.

Holl dud ar vourc'h a zo war dreuziou doriou o zi. Meur a vaouez koz gant korn o zavanjer a zec'h o daoulagad ha meur a blac'h yaouank a ra an neuz da zec'ha o fri pa dremen ar vandennad dirazo o kana kantig « Santez Anna ar Palud ».

En dervez ma oa bet klevet ar c'helou e Kerdorozenn edo Gwennole Naour o farda mervel du-se e Beg-Meil, an Ao. Kure en doa lavaret d'e baotred yaouank er patronaj goude gousperou :

— Paotred Santez Janed a Ark, eun dra bennak a rankomp da ober evit goulenn pareañs hor mestr-skol karet. Goulennomp digant ar Werc'hez Vari hor sklerijenna dre lavarout diou dizenez eus ar chapeled.

Lavaret ar bedenn, an Ao. Kure a c'houlenn digant pep hini ar pezh en deus soñjet.

Unan a lavar : « Lakaat eun oferenn evitan ». Unan all : « Lavaret eur chapeled amañ bemdez diouz an noz, ken a vo deut ar pare... ».

An darn vrasa a zo evit eur pirc'hirinded a binijenn.

— Mat ! eme an Ao. Kure, va soñj-me eo hoc'h hini holl asamblez. Kinnig a ran d'eoc'h mont er perc'hirinded da Santez Anna ar Palud, war droad, dre lavarout ar chapeled ha dre gana kantikou... ha me a lavaro an oferenn eno evit Gwennole.

— Mat-tre ! mat-tre ! Ao. Kure. Peur ez aimp ?

— Pa vezo pare Gwennole... Ma ne bare ket ez aimp ivez, met neuze e kemerimp hor veloioù...

Gwennole a oa pareet. Ar pirc'hirinded a vije graet war droad...

Ha da guz-heol ar meur santel, an dud a c'halle gwelout daouzek paotr yaouank o vont dre an hentou a-unan gant eur beleg yaouank.

Marteze e kave d'an dud oa kollet ar c'hiz e Breiz da vont da birc'hirina war droad.

N'eo ket e gwirionez... ha paotred Kerdorozenn a ro hirio eur skouer-vat hag a zougo frouez...

Ar baotred o deus baleet mat. Tri pe pevar ehan hag e Santez Anna da bemp eur diouz ar beure, an Ao. Kure a lavare an oferenn dirak e baotred yaouank skuiz gant o baleadenn a hanter-kant kilometr, met laouen. An Ao. Kure en doa klevet o c'hofesion... en hent, evel ma rae an aluzennerien epad ar brezel. Digarez a oa : ar baotred yaouank o doa labouret er gêr betek ar poent diweza...

Gwennole Naour, digaset gant karr-dre-dan an Ao. A Kerguaoc ha difennet outan mont war droad, a oa ouz an daol santel etouez an daouzek paotr kalonek...

Biskoaz, e Kerdorozenn, n'eo bet oferenn-bred sul Fask ken kaer hag er bloaz-mañ !

Gwennole Naour a zo azezet dirak ar benveg-muzig.

Ar vugale a gan kaeroc'h eget biskoaz, ar vachigoded en o c'haera a gas al lidou-sakr evel ma n'int ket bet kaset gwech ebet dindan doenn an iliz goz...

An Aotrou Person, er gador-brezeg, ne c'hoar ket penaos echui e brezegenn, ne gav fin ebet d'e drugarez evit Doue hag ar Werc'hez. Leñva, c'hoarzin a ra bep eil tro, hag an holl a ra eveltan.

Goude ehan-labour goueliou Pask, Gwennole Naour a grog adarre gant e labour-klas.

Bremañ e vezo tost d'ezañ mont er c'hlasou. Savet eo an ti-annez. Mari Naour ha Soazig o deus kempennet brao pep tra, er guzun, er sal-da-zibri, er sal-degemer hag er c'hambreier, er solierou.

Daou glas kaer a zo stag ouz an ti, an eil goude egile. Eun trede a vezo savet prest war an hevelep linenn... rak kreski a ra bemdez niver ar baotred-skol er skol gristen.

Met er c'hontrol digreski a ra hini paotred-skol ar skol lik.

An Ao. Flaouter a laka ar faot war gein an Ao. Bourdellec, « eun den diot, eun den diseven a n'en deus graet nemet droug gant e venoziou dispac'hus ».

Tamall a ra ivez eun dra bennak d'an Ao. Poulpriz hag eun dervez n'eo ket evit mirout da lavaret d'ezan :

— Ya ! ar vugale a guita hor skol evit hini ar veleien... Ar skolaerien lik, socialist ha komunist, eo a zo penn-kaoz da gement-se. An dud o deus aon rak ho menoziou... ha tro o deus...

— N'oun dare, Aotrou Rener, hag hor menoziou-ni a zo kiriek d'ar baotred d'hon dilezel evit ar mestr-skol kristen... Ar pezh a zo sur eo he deus merc'h an Ao. Flaouter sikouret war ar poent-se ar mestr-skol kristen...

— Kunujennou bremañ ? Kemenn a ran d'eoc'h rei da anaout dioustu petra c'hoantit lavaret...

— Goulennit digant ho merc'h perak ez a bep sul d'an oferenn-bred, perak e chom da gaozeal gant mamm ar mestr-skol kristen ha gant hemañ e-unan bep wech ma vez o vale diouz an abardaez a-unan gant he mamm... pa ne vezit ket c'houi ganto..., ouz ober petra eo bet e Beg-Meil gwisket e giz breizek, a-unan gant an Aotrou Person... ha meur a dra all...

— Goulenn a rin diganti, met sur oun eo direbech va merc'h. Gwaz a se evidoc'h eta ! rak kastizet e vezot evit ho komzou flemmus.

N'oa ket torret c'hoaz imor ar mestr-skolaer pa deuas Mona er sal-dibri evit lein.

— Ha gwir eo ar pezh a glevan diwar da benn, Mona ?

Hag an tad da ziskleria dirazi tamallou ar skolaer socialist.

Mona ne lavar grik. Kaer en deus an tad klask he lakaat da nac'h an tamallou, Mona ne lavar ger ebet evit en em zifenn.

An Ao. Flaouter a fardas pennfolli o welout oa re wir ar pezh a lavared diwar-benn e verc'h.

— A ? ! evit gwelout Gwennole Naour eo e vezez en oferenn-bred bep sul ? e vezez o vale goude ar c'hlas ? out bet e Beg-Meil, gwisket e Breizadez..., a-unan gant

ar person ! Bremañ emañ brao..., rak an holl draou-se a vezo diskleriet, re anat eo, da enseller-meur Kemper...

Va retred a c'hallin da c'houlenn bremañ ! merc'h diboell ha penn fall !... biken, biken, klevout a rez, me beo, ne vezi gwelet o timezi gant an den-se, gwelloc'h e gwirionez eget ar re o deus klasket e laza, met eun den hag a vezo da viken eun enebour evidoun... Hiviziken ne di da oferenn ebet pe ez i d'an oferenn-beure ha bemdez ez in ganez da vale. Pa ne c'hellin ket mont, te a chomo er gêr ivez... N'out nemet eur verc'h digalon ! !...

Mona a ouelas.

Allas ! poan he dije o klask gounit he zad.

O ! na pell edo c'hoaz al levenez diouti !...

An Ao. Flaouter en taol-mañ ne blegas ket d'e verc'h ha santout a raed ne blegfe biken war ar poent-se...

Evelato kaer en devoe spia, mirout ouz Mona da welout an Ao. Naour, Mona a ziskouezas n'oa ket sotoc'h eget he zad. Eur wech ar sizun Gwennole a reseve eul lizer digant Mona ha Mona unan all digant Gwennole.

Mona a skrive d'ar merc'her en he c'hambr, diouz an noz. D'ar yaou a veure ez ae, e-pad ma veze Gwennole oc'h ober e glas-kan hag o teski al lidou-sakr, da di he mignonez Marc'harid Toullec en digarez he gwellout. An tad ne gredas ket mirout outi... daoust ma soñje marteze e c'halle hi skriva ha lezel he liziri eno.

Eur wech e kredas goulenn digant Marc'harid ha ne reseve ket liziri digant Mona en ti.

Marc'harid a gasas ar mestr-skolaer da, vale m'hel lavar d'eoc'h, « Evit piou e kemere Marc'harid Toullec ! ! daoust hag an traou-se a selle outan ? »

An Ao. Flaouter a welas e skrive Mona. Marc'harid n'oa ket bet fin... o vont e kounnar.

Evelato ar mestr-skolaer a soñjas oa gwelloc'h ober an neuz da chom hep gouzout. Mona a c'hellfe kounnari evit mat hag an tad n'en em sante ket kreñv awalc'h da enebi outi betek ar fin... ha neuze dre guz oa... E-pad an ehan-labour bras an Ao Flaouter a yafe da welout bro ganti... Gwennole a vo ankounac'haet... Er bloaz a zeu e vo pedet holl skolaerien tro-war-dro da zont da Gerdorozenn d'ar yaou... Mona a gavo an dibab...

Da c'hedal, Gwennole a gav bep yaou da noz eul lizer karantezus e ti Marc'harid Toullec...

Gant eur galon heoliet eo eta e kempenn Gwennole e baotred evit an « testeni-studi ».

En dro-mañ e taolo evez e-unan, gounezet en deus eur skolaer lik evit e sikour. An traou war eeun... Meur a skolaer lik a zo a-unan gantan war ar poent-se.

Eiz paotr a ginnig er bloaz-mañ Gwennole Naour. An daou a zo bet korbellel warlene, ha c'houec'h all ouspenn. Gwelet e vezo gant piou e chomo an trec'h

XI. Ar reolenn diouyezek

Derc'hent devez arnod an « testeni-studi », Gwennole Naour a gave e ti Marc'harid Toullec eul lizer a-berz Mona Flaouter.

N'oun ket evit hen rei da anaout penn-da-benn. Traou a zo ennan a ne sellont ket ouzimp, ne lavaran ket avat ne lakaont ket bannou heol ar garantez e kalon Gwennole.

Kement-mañ a c'hellan da ziskulia :

« *Va Gwennig karet,*

« *Ar c'hoaz veure e klevin an oferenn hag e tostain ouz an daol santel evit goulenn digant Doue ar c'hras d'it da welout da eiz paotr-skol o tont d'ar gêr gant lore.*

C'hoant bras em eus d'az gwelout en enor, n'eo ket hepken dre m' az karan evel ma c'houzout, met evit ma vezi digollet diouz ar boan az peus bet en daou vloaz tremenet da genver an hevelep arnod, hag ivez evit ma vezo goulouderet buan ar skoliou lik ! (O ! ma ven klevet gant va zad !) Kompren a rez perak e hetan kement-se. Neuze ez afe an Ao. Poulpris kuit ha, goude eur pennad bouderez ha kounnar, va zad a deufe da deneraat. Chans vat eta !... hag all..., hag all...

Da Vona... da viken. »

Kaout berz-vat evit gouloudera ar skol lik, evit pellaat an Ao. Poulpris, evit gounit en-diwez spered ha kalon an Ao. Flaouter, hennez eo ivez menoz Gwennole..., hag eun dudi eo evit e galon gwelout he deus Mona an hevelep menoz gantan war ar poent-se... evel war meur.a boent all...

N'eo ket hep terzienn e tremenas Gwennole beurevez an arnod e kêr Kemper. Ne guitaas tamm ebet kourt ar skol lik hag alies ez ae da sellout dre ar prenestr er sal. Kement-se a roe kalon d'e baotred dre ma soñjent : hor mestr-skol karet a zo aze a-unan ganimp...

Meur a skolaer lik a deuas da serra e zaouarn d'ezan ha da ziskleria : « *Va gourc'hemennou evit beza aet e-biou d'ar maro. An Ao. Bourdellec n'edo ket a-unan gant ar pep brasa eus ar skolaerien lik. Kondaoni a reomp taol falakr e vignoned.* »

Pa deuas ar baotred er maez etre daou arnod-skriv Gwennole a welas, goude beza graet goulennou ouz pep hini eus e baotred, n'oa, ket aet re fall ganto. Daou avat a oa bet manket eun tammig war ar jedi. Met war an danevell n'oant ket fall. En em zigoll e c'hellent c'hoaz...

Goude lein kemeret e kêr ha paeet gant an Ao. Kerguaoc, ar baotred-skol a rae arnod an « danevell »... ha da beder eur e teue an enseller da lenn anioiou ar re resevet evit « ar skrid... »

Pa engavas gant skoliou Kerdorozenn e voe klevet :

Skol lik : Glaoda Kalvez, Visant Kemener, Loeiz Talleg, Yeun Penneg, Per Monot. (*Pemp war eiz*).

Skol gristen : Loeiz Madec, Herri Karadec, Fanch Gourmelen, Paol Abherve, Per Keginer, Herri Kerautret, Paol Surzur, Visant Lichou. (*Eiz war eiz*).

Gwennole a ruilhas diou zaerenn war e zioujod...

Abred pe ziwezat Doue a ro da bep hini hervez e labour.

Met n'oa ket echu an abadenn. An « arnod-goulenn » a ranked da dremen c'hoaz.

Da bemp eur e voe roet da anaout anoioù ar re a oa digemeret evit mat. Holl baotred an Ao. Gwennole a deuas o ano er maez adarre. Ha tri anezo o doa an notenn « mat-dreist » : Loeiz Madec, Herri Karadec ha Fanch Gourmelen. Daou all o doa an notenn : « mat ».

Goude beza lennet an holl anoioù, an Enseller hag a zo eun den eeun, a lavar :

« Va mignoned, kinnig a ran va gourc'hemennou da Wennole Naour, mestr-skol kristen Kerdorozenn. Ret eo rei da bep den hervez e virit. An Ao. Naour en deus kinniget eiz paotr-skol. O eiz o deus gounezet brao o zesteni. Daou anezo dreist-holl a zo aet dreist : Loeiz Madec hag Herri Karadec. Bet o deus an notennou uhela a zo bet roet betekhen e arnodou testeni-studi Kemper. Dislavarout a ran ivez e ano an holl skolaerien lik an taol-fallagriez a zo bet graet da Wennole Naour. »

Hag an Ao. Enseller a deu da serra daouarn mestr-skol kristen Kerdorozenn.

Eun ober hag a ra enor d'an Enseller hag a ro da anaout ez eus etouez skolaerien ar c'houarnamant estr eget komunistet hag enebourien ar garantez hag ar reizded...

Evurus omp da anzav zoken ez eo ar re vat anezo trec'h ha trec'h brao d'ar re fall. A drugare Doue !

Biskoaz en he buhez-auto n'he deus auto an Ao. a Guerguaoc graet kement a drouz ha bet kement a lorc'h enni ouz en em gaout e bourc'h Kerdorozenn eget en devez m'he deus diskarget dirak ar presbital an eiz paotr-skol kurunet hag o mestr-skol karet. Skourrou-gwez, bokedou bleun a weled e pep lec'h en dro d'ar wetur.

M'o doa ar baotred kanet en hent etre Kemper ha Kerdorozenn, kenderc'hel a rejont gwasoc'h c'hoaz betek ar gêr, goude beza tanvaet chistr an Ao. Person...

Mona Flaouter a deuas war al leurenn-gêr pa glevas an trouz. Spurmanti a reas Gwennole hag, hep m'en defe den gwelet nemeti, Gwennole en doa diskouezet d'eiz eiz biz...

Mona a yeas da drugarekaat an Aotrou Doue en iliz epad ma kleve ar re all ouz anzav : « Eiz war eiz, eiz war eiz. Gounezet mat en deus al levez-se ar paour kaez Ao. Gwennole...! »

Mona Flaouter he deus bet poan o kuzat he levez, dirak e zad. Klevout a ra gantan penaos Gwennole a zo aet an trec'h gantan, penaos eo bet zoken gourc'hemennet dirak an hol gant an Enseller. An Ao. Bourdellec eo a zo bet ar penn-kaoz a gement-se... « *Eun den diboell, eun den sotoc'h eget ar sota eus va bugale-skol...*

A ! brao eo bet d'in e Kemper ! An holl a selle ouzin hag a sonje, hag a lavare : An Ao. Flaouter eta a rank koll gant ar mestr-skol kristen !... Ya, an Ao. Enseller en deus kinniget e c'hourc'hemennou d'ar mestr-skol kristen ha d'in-me n'en deus ket zoken serret an dourn. Hag er bloaz a zeu ? Aon bras em eus n' ez afe ar pep brasa eus ar vugale a zo c'hoaz er skol lik d'ar skol gristen !... »

Fizians o deus, end-eeun, an Ao. Person ha Gwennole, e kresko adarre er bloaz a zeu niver paotred-skol er skol gristen.

Derc'hent an arnod e teue end-eeun an Ao. Pondusval da gaout an Ao. Herri.

— Aotrou Person ho klevet em eus eun devez o lavarout edo soñj Gwennole kemerout en ti-skol eun nebeut « pansionerien » evit gallout kaout e c'hounid e-unan ha diskarga evelse ar re a roe e bae d'ezan betekhen. En abeg-se, end-eeun, eo ho peus goulennet ober mogerioù ledan evit gallout diwezatoc'h sevel warno eur sal-dagousket evit bugale. Ar c'henta klas a ve lakaet da sal-da-zibri hag eur c'hlas all savet e penn ar c'hlas diweza... Mat ! me eo a lakay ober pep tra hag ouspenn kenderc'hel a

rin da rei da Wennole ha d'an daou skolaer all (rak daou all a rankot da gaout bremañ) ar pez a roen beteghen...

Hag ar pez en doa lavaret an Ao, Pondusval a voe graet.

An trec'h war dachen ar skol a seblant eta beza da Wennole ha kement-se dreist-holl en abeg d'e garantez evit ar vugale hag evit Breiz, evit yez ar Vretoned.

Eul lizer bet digant Enseller ar skoliou lik izel a roas tro da Wennole da ziskleria e venoz diwar-benn sekred e drec'h.

Aotrou ker,

« C'hoant em eus da c'houzout penaos oc'h deut a-benn da gempenn ken brao ho paotred- skol evit an « testeni studi ». Ar re o deus barnet skridou ar baotred-se a zo chomet souezet dirak o galleg en « danevell » Goulskoude kalz eus ar baotred-se a zo diwar ar maez hag a gomz brezoneg bemdez er gêr. Ne gomprenan ket e vec'h deut ker buan da zeski d'ezo ar galleg hag eur galleg divrezonkaet holl... »

N'ho pefe ket ar vadelez da rei d'in da anaout ho toare-ober da zeski ho pugale ! Nemet c'hoant ho pefe da zerc'hel « ho sekred » evidoc'h hoc'h unan, laouen e ven ouz hen rei da anaout da holl skolaerien lik ha kristen eus Fin-ar-Bed, rak, ma karit mat, ho respont a vezo kaset d'ezo holl war va c'hont-me... »

Teurvezit, Aotrou ker... »

An Ao. Naour ne c'hinas ket evit respont dioustu d'an Ao.Enseller.

Aotrou Enseller,

« Ho lizer a ziskouez fraez e klaskit brasa mad hag uhela deskadurez holl baotred Fin-ar-Bed. Evit kement se e kinnigan d'eoc'h, va gourc'hemennou kalonek. Laouen oun bet eta hag enoret o tigemout ho lizer. »

Ya, eur sekred em eus evit lakaat ar Vretoned bihan diwar ar maez... hag eus ar vourc'hou da zeski buan ar galleg. Eur sekred eo hag a roan da anaout gant eurvad hag e karfen e ve anavezet gant an holl skolaerien. Ar sekred-se eo « ar reolenn diouyezek », da lavaret eo : ar reolenn a zesk penaos, hervez ma lavar ar skiant-furnez, e tleer mont eus « an dra anavezet d'an dra dianav », eus ar brezoneg a c'hoar ar baotred (re ar maeziou) pe a zisneus o galleg (re ar c'hêriou e Breiz) d'ar galleg rik ha divreton.

Gant ar reolenn-se em eus gwelet mat kement-mañ : ar baotred o deus desket ar galleg en doare-se eo a deu da veza da genta e C'HENSTRIVADEGOU GALLEK, dre m'eo o galleg divreton ha dre m'eo karget hini ar vourc'hizien a droiou-lavar brezonek.

En doare-se e teskan ha brezoneg mat ha galleg peurvat d'ar baotred-skol e berr amzer hag evit brasa plijadur ar baotred-skol o-unan.

Gwir eo atao ar pez a skrive an den brudet Joseph de Maistre : « An neb a c'hoar diou yez a dal daou zen, an neb a c'hoar teir a dal tri zen... hag all... »

Aotrou Enseller, kas a ran d'eoc'h a-unan gant va lizer eun tamm labour savet gant unan eus hor skrivagnerien breizat « a-zivout ar reolenn diouyezek ». Kaout a ra d'in e kavot er studi-se peadra d'ho tougen da ober ha da lakaat ober gant ar « reolenn diouyesek ».

Teurvezit, Aotrou Enseller, degemerout... »

Gwennole NAOUR,
mestr-skol kristen Kerdorozenn.

XII. An neb a venn A deu a benn

An Enseller ne gredas ket embann lizer Gwennole Naour.

« Ministr an Deskadurez » en dije gourdrouzet ha dislavaret... Met hiviziken ouz ober e dro e skoliou Fin-ar-Bed e pouezo bep gwech war talvoudegez ar « reolenn-diou-yezek ». Meur a skolaer lik a heulio ar reolenn-se hag holl e raint berz.

E Kerdorozenn, ar baotred a zo deut adarre er skoliou, met er bloaz-mañ ez eus c'houec'h-ugent paotr-skol er skol gristen hag ugent er skol-lik, c'houec'h eus ar re-man a zo paotred « bastard » e karg ar c'houarnamant.

An Ao. Poulpriz a ranko mont kuit araok pell.

An Ao. Flaouter ne c'hoar ket ouz piou en em gemer hag e tamall an holl, met dreist-holl ar mestr-skol kristen.

Hemañ a wel e « bansionerien » o vont bemdez war gresk. En devez kenta en doa pevarzek..., araok fin ar bloaz en devo tregont.

Soazig bremañ he deus labour awalc'h da ober war dro ar vugale, ouz aoza boued d'ezo hag o sikour kempenn o dilhad. An daou skolaer yaouank o deus pep hini e gambr e daou benn ar sal-da-gousket.

An Aotrou Person a bae o fansion en ti-skol hag evelse e tebront a-unan gant Gwennole ha Mari Naour er sal-da-zibri, dirak diou daoliad ar bansionerien hag an hanter-bansionerien da lein ha dirak ar bansionerien nemetken da goan.

Ar skol a ya en dro eta...

« Kuzulerien an ti-kêr » evelato n'eo ket falvezet ganto c'hoaz rei sikour d'ar skol gristen. Goulskoude meur a hini o deus grosmolet :

« Perak e ve sikouret ar skol lik ha nann ar skol gristen ? Er skol lik n'eus nemet ugent paotr-skol, er skol gristen ez eus c'houec'h-ugent... hag hor bugale-ni int, bugale ar re a bae an tailhou, ar c'hontributionou... »

Araok bloaz eo anat e vezo cheñchet penn d'ar vaz, zoken en ti-kêr...

Allas ! m'eo trec'h karantez Gwennole da fallagriez an dud hag al lezennou direiz, karantez Mona hag e hini n'int ket evit trec'hi gourvenn an tad kounnaret, Stephan Flaouter.

Abaoue m'en deus resevet eul lizer-rebech digant an Enseller, n'eus ket da dostaat outan. Lakaet en deus en e benn dimezi Mona; rak soñjal a ra ne vezo evit ober netra vat ebet etre ma vezo e verc'h a-unan gant e enebourien.

Pa vezo dimezet Mona, neuze marteze ar skolaer kristen a blego eun tammig e benn, a fallgalono.

Bep yaou bremañ, e teu da di mestr-skol lik Kerdorozenn skolaerien yaouank diwar dro, kelennerien eus skolajou Kemper.

An Ao. Flaouter eo o fed.

Meur a hini a deu evit kaout tro da ober eur bale. An darn vrasa a deu en autoiou, unan bennak war velo hag ar re dosta war droad evit gwelout ar vro hag evit kemeret an aer vat, a lavaront.

D'an holl, Mona a ziskouez dremm laouen. Gwelet mat he deus menoz he zad.

Meur a hini a gav Mona eur plac'h koant ha ouizie, re ouizie marteze, rak alies a wech he deus kaset meur a arreal d'ar gêr ha klozet brao meur a veg lies-lavarek ha lorc'hus.

Kalz eta a glask gounit he c'halon, met Mona ne ziskouez ket muioc'h a garantez da unan eget d'egile.

Hag eun devez, unan bennak a c'houlennas Mona da bried digant an tad. Moarvat en doa aon na ve laeret ar plac'hig d'ezan gant ar re all.

— Dija ! a lavaras Stephan Flaouter, ennan e-unan. Mat ! fred a gavo eta Mona da zimezi er bloaz-mañ.

Ar plac'h, pa voe goulennet diganti he soñj war ar paotr yaouank-se a respontas dioustu sec'h : « Nann ha nann ! ! »

— Mat ! mat ! eme an tad, izelek ha c'houek, amzer az peus. Me kennebeut ne blij ket hennez d'in... Ar re falla eo a deu da genta... Dont a ray re all... gwelloc'h... Mat a rez gortoz.

An eil goude egile a c'houlenne hag an eil goude egile en deve... e sac'h, ha bep gwech e veze respontet hep marc'hata : « Nann ha nann... »

An tad a deue da ziskredi war berz-vat gweladennou ar skolaerien lik.

Dek goulenn bennak he doa Mona nac'het dija pa deuas eun unekvet... An hevelep respont a voe roet : « Nann ha nann ».

— Met evelato, Mona, ez kavan diaes da gontanti... Ret mat e vezo d'it degemerout eur goulenn bennak...

— Pa vezo kinniget d'in ar goulenn a blij d'in neuze ez asantin rak moarvat me eo a zo da welout e pelec'h emañ va levenez !...

Ar paour kaez tad ne c'houie mui petra da soñjal. Sikour ebet ne c'helle kaout digant ar vamm, Anna. Eur wech he doa kredet distaga eur ger war sikour unan eus ar goulennerien...

— Va mamm, he doa respontet Mona, c'houi a c'hoar petra zoñjan war ar poent dimezi. Biken ne chenchin meno...

Ne chome en dro da Vona nemet eur c'helenner eus Kemper, an Ao. Viktor Perennes. Hemañ a oa a-bell an hini gwella eus an holl skolaerien deut da glask gounit merc'h an Ao. Flaouter. Speredek, kalonek ha koant en e gorf, pep tra en doa da blijout.

An tad a gav d'ezan he deus Mona nac'het o goulenn diouz ar re all dre ma c'hoanta kaout an Ao. Perennes. Met an Ao. Perennes ne hasta ket da ober e c'houlenn.

Emañ tost fin ar bloaz-skol ha n'en deus ket kredet c'hoaz dizolei e venoz.

An Ao. Flaouter a zo diaesoc'h diaes e benn.

Er yaouvez setu Viktor en-diwez ! o tiskleria e c'houlenn d'an tad, pa ne gred ket komz ouz Mona war eeun evit gouzout he soñj, araok digas e dud d'ezan da ober ar goulenn evit mat.

— Arsa ! Mona, setu hirio ar goulenn a c'hedez. Kavet eo ganin e karez Viktor Perennes. Emaen o paouez diskleria d'in e karfe az kaout evit pried da viken. Viktor a zo eun den hegarat hag ouspenn eun den katolik eo. Ar pezh ne ray ket a zisplijadur d'it, marteze.

— Va zad ! va respont a roin da Viktor e-unan.

Ha Mona a ziskenn er sal-degemer.

Viktor pa wel ar plac'h yaouank o tont d'e welout a soñj dioustu... eo graet an taol... ha buan ez a da gregi en he daouarn ha da boket d'ezo...

— Ao. Perennes, eme Mona, pa ez int azezet o daou, ho trugarekaat a ran eus ho koulenn enorus. Laouen, laouen bras oun o veza bet dibabet ganeoc'h evit reseo eur seurt goulenn... Anaout a ran ho kalon vat, hag evurus e vezo, sur oun, ar vaouez a zibabot evit beva ganeoc'h.

Viktor a soñj ennan e-unan eo hir komz ar plac'h yaouank... pa ne c'heder eus

he ferz nemet eur « ya »... Teuzi a ra eun tammig e vouse'hoarz...

— Va respont a vezo fraez, Ao. Perennes. Ma ne ve ket bet dalc'het va c'halon el lec'h all, ganeoc'h c'houi eo e ve falvezet ganin dimezi. Bremañ ne c'hellan ket, bremañ ne rin ket... Va digarezit eta hag a-nevez bennoz Doue da veza lakaet o soñj ennoun...

Ar paour kaes Viktor a grog en e dok hag a sach e skasou gantan. Ne vezo gwelet mui e Kerdorozenn.

Eun den kounnaret, e voe an Ao. Flaouter pa glevas he doa Mona roet e sac'h d'an Ao. Perennes evel d'ar re all, daoust m'en doa bet eun diarbenn c'houekoc'h.

— Penaos ? ! diarbennet az peus ivez Viktor Perennes, eur c'helenner ken speredek hag eun den ken kalonek ? ! Chom a ri dizemez eta ? Moarvat n'emañ ket da soñj atao er... mestr-skol kristen ? ! Neuze klev mat : biken ne zimezi gantan pe e timezi enep da dad ha dre gas da dad d'ar vered...

Mona en devez-se ne respontas ket...

D'ar yaou warlerc'h ne deuas den ebet da welout Mona... hag e lavaras d'he zad teñval bras e ben met eun tammig digounaret : « Va zad, diskleria a ran d'eoc'h fraez ne zimezin gant den ebet er bed-mañ nemet gant Gwennole Naour... Ne zimezin ket hep hoc'h aotre... Ma vez re ziwezat d'in dimezi pa vezo deut ar poent evidoc'h da vont da renta ho kont da Zoue, ma vez dimezet neuze Gwennole e c'houlennin beza degemeret en unan eus an urziou leanezed. Biken em buhez ne cheñchin meno war ar poent-se...

Stephan Flaouter a oa savet e wad d'e benn, Anna gaes a gemeras aon... hag a yeas d'ar guzun en digarez kemerout ar plad warlerc'h met e gwirionez evit tec'hout rak an taol-imor... An imor a gouezas... Stephan Flaouter a welas mat oa Mona kalonek evel he mamm met pennek evel he zad. Biken ne blegfe p'he doa hel lavaret.

An tad ne gonte mui bremañ... nemet war an amzer.

Met piou a lavaro poaniou kalon Gwennole edoug ar bloaz-skol a zo oc'h echui ?

Bep yaou en deus gwelet ar skolaerien lik o tont da Gerdorozenn evit gwelout Mona Flaouter. Yaouveziou trist en deus tremenet Gwennole er bloaz-mañ ! N'edo ket kalz e galon war ar c'han na war al lidou sakr... Penaos e vefe bet pa edo en ti-skol lik. Nag a bed gwech en derveziou-se en deus heñ sonjet : Mona, eun devez a ranko plega d'he zad. Etouez ar skolaerien a deu d'he gwelout e kavo en-diwez unan hag a blijo d'ezi muioc'h eget ma ran-me... Ha Gwennole a veze droug ennan awechou hep goût d'ezan hag ar baotred a wele ivez n'oa mui Gwennole an hevelep den laouen, hegarat, hag e lavarent : « An tenn a zo aet en e benn en deus troet temz-spered Gwennole Naour ! »

Goulskoude bep yaou da noz e kave lizer Mona e ti Marc'harid. Houmañ a lavare da Vona e cheñche Gwennole, oa tristoc'h trista ha Mona en he liziri a glaske beza karantezusoc'h karantezusa.

Diou pe deir suzunvez er bloaz Gwennole ne gavas ket al lizer evel kustum.

Diou, teir suzunvez bouverez evit kalon Gwennole.

« Echu oa en taol-mañ. Mona be doa kavet an den da blijout d'ezi. Dilezet oa Gwennole. »

Met er suzun warlerc'h lizer Mona a roe da anaout penaos oa bet hi siferniet hag he doa bet difenn da vont er maez...

Ha neuze Gwennole a wele bep miz unan pe unan eus ar skolaerien o chom hep dont da Gerdorozenn. Lizer ar suzun warlerc'h a lavare : « Unan all kaset da sotal brulu... »

An Ao. Perennes, Gwennole en doa klevet e ano gant Marc'harid, a chomas pelloc'h. Diwar e goust eo ivez e c'houzañvas Gwennole ar brasa poan. Eun den da blijout oa, eun den desket ha, diouz ma lavared, eun den a zanvez.

Eun devez lizer Mona a lavare : « *Ouf! kaset kuit an hini diweza. Hemañ, Gwennig, em eus bet muioc'h a boan ous e gas... da vale... rak muioc'h e plije d'in eget ar re all... Bremañ, Gwennig karet, ne pezo tamm tro ebet ken da zisfiziout war karantez ha kendalc'husted Mona Flaouter. Va zad a zo kounnaret holl. N'ouzon ket peur e c'hallimp beza unanet dirak Doue. Da vihana me a c'hedo ar pez a vezo ret... ha ma pleg unan bennak n'eo ket me a ray. »*

Stephan Flaouter ne blege ket kennebeut.

Da arnod an testeni-studi n'en doa nemet eur paotr-skol da ginnig hag ar mestr-skol kristen en doa pevarzek.

Paotr an Ao. Flaouter a oa degemeret ha gwell a se, evitan hag evit ar re all, rak bihanaat a reas evelse e warizi hag e gounnar. War ar pevarzek kinniget gant ar skol gristen daou a chomas war an dachenn. Gwir eo, an daou-se en doa kinniget Gwennole evit senti ouz ar gerent, kaer en doa bet klask diskouez d'ezo n'oant ket evit tremen an arnod hag o defe muioc'h a chañs er bloaz da zont...

Pemp paotr-skol a gollas adarre an Ao. Flaouter pa zigoras ar skoliou en doare ma ne chome mui nemet pemzek paotr gantan. En taol-mañ e fallgalonas hag e c'houlennas beza diskarget eus ar skol ha kaset d'eur skol all.

Ne voe ket selaouet e c'houlenn : « *Pa en oa lezet skol lik Kerdorozenn da goueza en he foull n'edo ket ar poent evitan da vont da goll unan all e lec'h all. »*

Kalet oa ar respont. E Kemper e seblanted dianaout en doa an Ao. Flaouter dirazan eur person hag eur mestr-skol kristen a n'o doa ket aon rak o skeud hag o doa lakaet en o fenn dont a-benn eus ar skol lik. Evel ma weled an tu mat o doa kemeret, rak kaset o deus o ero da benn...

Diwar an devez-se an Ao. Flaouter a lezas da gas...

An Ao. Poulpriz a c'houlennas e-unan cheñch skol. Den ne deuas en e blas en doare ma chome an Ao. Flaouter e-unan.

Dirak al labour ar mestr-skolaer a chom dinerz, dic'hout.

Pa ne vez ket harpet gant e renerien n'eo ket dâ d'ezan en em greñvi. Gwelout a ra bremañ n'emañ ket atao ar garantez ouz tu ar skoliou lik, ha marteze zoken e teu eun draïg bennak da welout ne vez ket roet d'ar skoliou kristen ar frankiz, da vihana an harp a dlefent kaout.

Ar guzulerien, er bloaz-mañ, ne gredint ket nac'h ar skoazell a roent beteghen d'ar skoliou lik nemetken.

Eun dra all hag a ra eur boan vras d'an Ao. Flaouter eo gwelout penaos Mona, e verc'h, n'eo mui kel laouen. Ne c'houlenn mui mont e nep lec'h. Livet fall eo... ha pa lavar he zad d'ezi mont da ober eur bale war ar maez e respont : « Hag ez in, va zad, ganeoc'h, el lec'h ma karot... »

Bet int diou pe deir gwech e Kemper, e Pont-Aven, e Konk-Kerne hag e meur a lec'h all.

Mona a gas er c'harr-dre-dan he zad hag he mamm d'al lec'h ma c'houlennont mont met hi ne ra van nag eus ar mor, nag eus ster Aven, nag eus kaerder ar maeziou...

— Mona, klañv e rankez beza.

— Em c'horf n'oun ket klañv, a gav d'in da vihana, em c'halon avat ne lavaran ket ne ve ket ar c'hleñved...

— Atao e soñjez e... Gwennole Naour.

— Ya, va zad, hag e rin... da viken.

M'he defe kredet, ar vamm a, ve deut meur a wech war sikour Mona met abaoe m'he deus bet eur respont kalet digant he fried evit beza klasket ober gourc'hemennou ar mestr-skol kristen, ne gred ket ken digeri he genou...

Eun devez all Stephan Flaouter a lavar d'e verc'h.

— Peogwir out ,klañv gant da vestr-skol kristen, dimez gantan, bloaz war'n ugent az peus, me n'oun mui evit mirout ouzit.

— Lavaret em eus d'eoc'h, va zad, ne zimezin nemet gant hoc'h aotre, n'in en iliz nemet kaset ganeoc'h. Da c'hedal e chomin da... goza, ma ro Doue buhez d'in.

Da ehan-labour Pask, Stephan Flaouter n'eo mui evit enebi. Mona, ma kendalc'h, a gouezo klañv, ha bremañ an tad en em c'houlenn :

« Ha gwir em eus da virout ouz va merc'h da zimezi gant eur mestr-skol kristen ? » Evit kaout ar respont d'ar goulenn-se eo ez a eun devez da Gemper da gaout e vignon Désiré Rousseau, hag a oa o paouez kemerout e retred.

Hemañ ne c'hinas tamm ebet da respont :

— Da verc'h, mignon, a zo end-eeun, e riskl da goll he yec'hed ma kendalc'h. N'he c'havan ket doareet mat tamm ebet... Dimezi gant eur mestr-skol kristen ? Perak ne rafe ket ? Kleo, Stephan, va menoz war eeun. En hon amzer-ni e kave d'imp edo pep gwir gant hor skoliou lik. Bremañ eo disielllet hon daoulagad. Hor skoliou lik a zo muioc'h-mui enep Doue, enep ar reizded, enep ar garantez, etre daouarn ar sosialisted hag ar gomunisted. Va c'hret mat, Stephan, ar gwir a zo gant ar skoliou kristen... ha diouz ma welan mestr-skol Kerdorozenn a zo eur skolaer eus an dibab hag eun den mat eo ouspenn.

— Met petra lavaro ar skolaerien lik ?...

— Ar pezh a garint..., ma rankfer ober diouto e ve fall ar stal..., ha neuze ne zigemerez den ebet ken a lavarez d'in.

— Nann.

— Mat ! ro buan da c'her d'az merc'h. Eun dra vat eo, eun dra ret... ha kenta ma c'helli kemer da retred...

— Bennoz d'it, Désiré, evit da aliou mat..., ober a rin hervez ma lavarez d'in daoust ma kavan kalet dislavarout va amzer dremenet...

— Eun dra enorus eo anzav eur fazi, mignon ker, ha mont da heul ar wirionez.

— Pa vezo dimezet Mona, digas da vab-kaer eun devez bennak d'am gwelet. Mall em eus da ober anaoudegez gant eun den hag a zo bet mestr war ar skolaerien lik ha... war galon merc'h ar mestr-skolaer...

En hent da zistrei da Gerdorozenn, an tad a roas e aotre da Vona. Houmañ ne grede ket da genta.... met pa glevas penaos he zad a oa bet gounezet gant Désiré Rousseau, ne c'hallas ket mirout da waska war ar « buanaer » hag ar wetur a vintas.

Karantez Mona a gase ken buan ar c'harr-dre-dan etrezek Kerdorozenn ma seblante heñ kaout eskell.

Koulmig wenn kalon Mona eo he doa digoret he askellou ha bremañ he nije... er garantez...

Stephan Flaouter en devoe en devez-se digant e verc'h eur pok hag a lezas e

verk pell war e jod...

XIII. Ren Ar Garantez

Tri miz heol, tri miz levenez dispar...

Abaoue an eil sul goude Pask, Gwennole Naour ha Mona Flaouter a zo « en em brometet ».

Bremañ e c'hellont en em welout dirak an holl, mont da vale bemdez goude ar c'hlas. Na kaer eo Mona gant gwiskamant ar vro !

An diou vamm a gar en em gaout ivez asamblez hag alies ez eont o diou warlerc'h ar c'houblad laouen da gemerout an aer noz. An diou vamm a zo ken heñvel an eil diouz eben, graet int kement evit en em entent !

O tont eus o baleadenn an daou « brometet » a dremen eur wech an amzer e ti Marc'harit Toullec, hag e vez kontet marvailhou, e vez komzet eus tristidigez Gwennole, eus poan-galon Mona... hag e vez c'hoarzet...

Stephan Flaouter en deus bet meur a lizer kunujennus abaoe, met o zaolet en deus en tan ; dont a reont dreist-holl digant ar skolaerien bet d'ezo o sac'h ha digant enebourien touet ar skol gristen : ar sosialisted hag ar gomunisted...

An eured a zo lakaet evit deveziou kenta miz eost, en abeg rei amzer d'an daou bried nevez da ober o bale-eured araok ma tigor ar skoliou.

An Aotrou Person en deus lakaet en e benn ober an traou e doare. Skrivet en deus d'an Ao. Vikel-bras Kerne, evit goulenn digantan kaout ar vadelez da zont da eureji e vestr-skol kristen.

Eun nebeut deveziou goude e tegemere ar respont-mañ :

« *Aotrou Person,*

« *Ho trugarekaat a ran da veza sonjet ennoun evit eureji ho mestr-skol karet ha ken brudet... Va digarezit ma ne asantan ket d'ar blijadur-se. Gwelloc'h em eus kavet. Goulennet em eus, en hoc'h ano, digant an Aotrou 'n Eskob mont e-unan da venniga an eured-se.*

Dioustu pa en deus klevet da eureji piou oa, an Aotrou 'n Eskob karet en deus diskleriet : « Mont a rin gant levenez, evit diskouez va anaoudegez-vat da Wennole Naour hag evit kouez va c'harantez e kenver an holl skolaerien a ro o yec'hed hag o buhez eveltan evit sevel ha derc'hel en o sav hor skoliou kristen. »

Rak-se, Aotrou Person, n'eo ket vikel-bras Kerne eo a vennigo eured ho mestr-skol met an Aotrou 'n Eskob.

Evelato Vikel-bras Kerne a yelo ivez d'ar « friko » pa eo pedet ganeoc'h en eun doare ken kalonek... »

Hag an eured a zo bet graet... An Aotrou 'n Eskob, evel kustum, zo bet mat hag helavar. Diskleriet en deus istor skol kristen « Sant Gwennole ». An Aotrou Person en deus ranket klevout e lod eus ar gourc'hemennou. An Aotrou Kure n'eo ket bet ankounac'haet, na den all ebet...

Met p'en deus an Aotrou 'n Eskob komzet diwar-benn labour Gwennole, e boan, e c'hloaz, e garantez evit bugale ar barrez, holl dud an iliz — (hag eun den eus pe ti zo deut d'an oferenn hervez goulenn an Aotrou Person) — a lez o daerou da ruilh...

Ha penaos diskleria ar c'homzou c'houek meurbet a lavaras an Aotrou 'n Eskob da Vona Flaouter eun dudi sellet outi gant he dilhad gwenn hag alaouret breizek, da Anna he mamm, da Stephan Flaouter, he zad ?

Kinniget en deus e c'hourc'hemennou d'ar plac'h eeun ha pennek he deus dalc'hed d'he fenn er skoliou uhel en desped d'ar skoueriou-fall he deus gwelet.

Feiz ar vamm a zo bet trec'h enni d'an deskadurez difeiz roet e kalz re a skoliou lik. Diskouez a ray epad ar vuhez nevez emañ-hi o vont enni an hevelep feiz hag an hevelep karantez he deus bet digant he mamm. Ar feiz, hag ar garantez, setu herez eur vamm vreizat, setu an herez ho peus bet digant ho mamm garet, dimezell Mona Flaouter. Dalc'hit start d'an herez-se evit he rei diwezatoc'h d'ar vugale a blijo gant Doue rei d'eoc'h.

Diarvar oun en ho keñver, rak digant ho tad karet ho peus bet eur volontez didorrus. Ra vezo implijet bepred evit ar brasa mad.

« Va lezit, va mignoned, da ziskleria breman va levenez o welout penaos en deus an Aotrou Doue gounezet tud ar barrez-man dre ar garantez. Hen gouzout mat a ran, kalz ouz ar skolaerien lik a zo henvel eus tad ar plac'h nevez a ra hirio hol levenez hag hon estlam, tud eeun, troet ouz ar wirionez hag ar reizded.

Eur bedenn kalonek a rin eta evit an daou zen nevez a zo bremañ dirak an aoter, evidoc'h holl, mignoned ha bugale ker, met dreist-holl, evidoc'h c'houi, Ao. Flaouter, en abeg ma skedo a-nevez en ho spered ar wirionez kristen hag evit ma vervo ho kalon gant tan karantez an Aotrou Doue. Neuze levenez ar gouel-man a vezo peurleuniet... »

Ma n'em eus gallet rei nemet ar skeud eus prezegenn helavar an Aotrou 'n Eskob, ne vezin ket barrekoc'h e keñver ar c'han dudius, ar c'hantigou brezonek, ar muzig a voe klevet epad an oferenn-eured. Mestr-chapel iliz-veur Kemper e-unan a oa gant ar benveg-muzig hag an Aotrou Kure a-unan gant ar ganerien hag ar c'hanerezed o deus kaset ar c'han.

Biskoaz ne voe bet gwelet eun eured ker brao iliz parrez Kerdorozenn.

En dro d'an Aotrou 'n Eskob pemp chaloni, daou-ugent beleg a rae, er chantele, eur gurunenn gaer dirak an aoter.

Ar pezh ne veze ket gwelet alies kennebeut eo an holl vugale, re ar skoliou .kristen ha re ar skoliou lik, o vont gant o dilhad kaer araok an dud nevez. An Aotroned Pondusval ha Kerguaoc o doa goulennet paea « friko » ar vugale, en doare ma 'z eo bet eured Gwennole Naour ha Mona Flaouter gouel ar barrez a-bez.

Levenez hag unvaniez e pep ti.

Ar garantez o ren war ar c'halonou.

Trec'h ar garantez.

XIV. An Trec'h Leun

Daou vloaz a zo eo dimezet Gwennole gant Mona Flaouter, merc'h koant ar mestr-skolaer lik.

Ar skol gristen a gendalc'h da ober berz.

Daou-ugent « pansioner » a zo bremañ. Leun eo ar gambr-da-gousket.

Mona eo a vez oc'h ober ar guzun pe oc'h entent ouz ar vugale vihana er c'hlas bihan bep eil gant Soazig. An dud avat a lavar ne chomo ket hou-mañ pell ken plac'h yaouank. Meur a baotr yaouank a vez war he zro, a glevan lavarout. Soazig goulskoude n'eus ket hast ganti da zimezi. Poan he devo o kuitaat ar vugale vihan hag he mamm garet. Ne ve ket souez e chomfe da goza, da ober eur voereb, eur « voereb madigou ».

An Ao. Flaouter pa engav e-unan en ti-skol lik goude devez an eured, n'eo ket evit en em virout d'en em gaout skuiz gant ar skoliou.

Goulenn a ra e retred evit ar bloaz war-lerc'h.

Da c'hortoz e laka sevel eun ti kaer er vourc'h demdost d'ar skol gristen.

Eur wech an amzer e vez o welout Mona en ti skol kristen, met gwelloc'h e kav he reseo en e di. N'eo ket graet mat c'hoaz e lid-laz (sakrifis) :asanti koll gant e vab-kaer.

Goulskoude anat mat eo d'ezan emañ ar gwir gant Gwennole. Ar gwir e keñver an *deskadurez*. Gant ar « reolenn diouyezek » ar mestr-skolaer kristen en deus kavet an tu aez ha buan da zeski war an hevelep tro brezoneg ha galleg reiz.

Gwaz a se d'ar skolaerien lik ha kristen hag a nac'h gwelout ar sklerijenn...

Ar gwir ivez e keñver ar *gelennadurez*. Hep ar relijion, ha n'eus gwir relijion nemet ar relijion katolik, n'oar ket evit lakaat na derc'hel ar bugel war hent ar furnez hag an onestiz.

Hag eun dervez e teuas er bed-mañ e ti ar skol gristen, eun aelig bihan a voe anvet gant e dad paeron Stephan Flaouter hag e vamm maeronez Mari Naour, Gwennole evel e dad. Ganet oa, an hini kenta, er skol « Sant Gwennole » Ano ar manac'h brudet a ranke da zougen...

Abaoue e weler alies an tad paeron o tont da welout e filhor. Amzer en deus ouspenn rak roet eo bet e retred da Stephan ha bremañ emañ o chom en e di nevez.

Alies e vez gwelet o vont da vale war ar maez gant Gwennole, goude ar c'hlas pe d'ar yaou ha diouz doare e vez kaoz ganto.

Eur yaouvez pe ziou eo bet gwelet zoken an Aotrou Person o vont asamblez ganto...

Hag eur sulvez, e iliz Kerdorozenn, Stephan Flaouter a yae ouz an daol santel, a-unan gant e vab-kaer Gwennole Naour.

D'al lein, a voe graet gant Mona en ti-skol en enor d'he zad adgounezet en-diwez d'an Aotrou Doue, an Aotrou Person a lavaras egiz grasou :

« *Ra vezo benniget an Aotrou Doue evit beza roet d'imp ar c'hras da drec'hi an droug, da veza roet an trec'h hag eun trec'h leun d'ar garantez...* »

(DIWEZ)

ROLL AR GERIOU DIAES

Ar gêr amezek	Ville voisine.
Araoger-etre-daou	Inter-avant.
Araoger	Avant.
Araoger-kreiz	Demi-droit.
Askeller-kreiz	Ailier gauche.
Arnod testeni-studi	Examen du certificat d'études.
Arrebeuri	Meubles.
Arvesti ouz	Regarder.
Arvestourien	Spectateurs.
Barner-tredeog	Arbitre.
Beurevez	Matinée.
Bizier	Cannes.
Bourevez	Martyre.
Broadelez	Nationalité.
Buanaer	Accélérateur.
Chantele	Chœur.
C'hoariva	Théâtre.
C'houek	Doux.
Dalbenn	Frontispice.
Damgredik	Demi crédule.
Danevell	Narration.
Demat	Bonjour.
Dic'hoarz	Sérieux.
Didorrus	Infrangible.
Didrec'hus	Imbattable.
Digas	Indifférent.
Dispac'hus	Révolutionnaire
Dizaouzan kaer	Bien décidé.
Douren	Liquide.
Eila	Accompagner.
Embregerez-korf	Gymnastique.
Enseller	Surveillant.
Gorrek	Lent.
Gouel	Voile.
Gourc'hemennet	Félicité.
Gourennata	Lutter.
Gourvenn	Rancune.
Gwâ hen	Hélas pour lui.
Gweladenn	Visite.
Gwidoroc'h	Avorton.
Hanteriad	Demi-centre.
Hanteriad-dehou	Demi-droit.
Hanteriad-kreiz	Demi-centre.
Ijinerez	Adresse.
Is-letanant	Sous-lieutenant.

Javed.	Machoire.
Jedi	Calculer.
Kablus	Coupable.
Kaerderiou	Beautés.
Kaoued	Cage.
Karnachi	Crier.
Karr-di	Grange.
Kaot	Pâte.
Kefluskerien	Moteurs.
Kendalc'husted	Persévérance.
Kenkizou	Villas.
Kenstrivadeg polotr troad	Championnat de foot- ball.
Kenstrivadegou	Concours.
Kevredigeziou ar breudeur skolaerien	Congrégation des Frères enseignants.
Kirri labour tredanek	Camions.
Kleiz	Craie.
Koantenn	Jolie jeune fille.
Koroll	Danse.
Krugell	Butte.
Kunujenn	Injure.
Kurust	Choriste.
Lies-lavarek	Bavard.
Lies-livet	Multicolore.
Louzaouer	Médecin.
Machigod	Choriste.
Maronitez	Maronite.
Oberata	Opérer.
Oberataet	Opéré.
Pal	But.
Paler	Garde-but.
Pirc'hirinded	Pèlerinage.
Poud	Lent, lourd.
Prederia	Méditer.
Ratoz	Résolution.
Reizded	Justice.
Rener-meur	Directeur général.
Roued	Filet.
Sal degemer	Parloir.
Sal-dibri	Salle à manger.
Siferniet	Enrhumée.
Skevent	Poumons.
Skiant Doue	Théologie.
Skiant furnez	Philosophie.
Skinarouezia	Télégraphier.
Skol kenta uhel	Ecole primaire supérieure.
Skoliad	Ecolier.
Spurmanti	Apercevoir.
Sut	Sifflet.
Suterez	Coup de sifflet.

Temz-spered
Ti annez
Tredan
Warlerc'hidi
Yezadur

Caractère.
Maison d'habitation.
Electricité.
Arrières.
Grammaire.

TAOLENN

I.	Brao - Brao ! « Paotred-Dispont ! »	3
II.	Eun den o klask e hent.....	9
III.	Person nevez Kerdorozenn.....	12
IV.	Kraou Bethleem.....	15
V.	Ar gounidou kenta.....	18
VI.	Glac'har ha Levenez	22
VII.	Bleun-Brug Kemper	25
VIII.	Gwarizi ha taol-droukrans.....	29
IX.	Daerou eur Person... hag eur plac'h yaouank	33
X.	Biken... ..	37
XI.	Ar reolenn diouyezek	40
XII.	An neb a venn A deu a benn	43
XIII.	Ren Ar Garantez.....	49
XIV.	An Trec'h Leun.....	51
	ROLL AR GERIOU DIAES	53